

bremañ 8 ru Hoche Roazon

bremañ


15 lur - miz Kerzu 89 - Nnn 99 -

NAONED : krog en-dro gant ar stourm !



EUSKADI : muntr ur c'hannad yaouank

CAPEs : Breizh 1 / Korsika 7



Biskoazh kement-all! Setu ma haroz ur vandenn dreset ! Mel ne roin ket deoc'h, ur chekenn ne laran ket... ha gant ar sec'h ha treut m'emañ an traoù bremañ, n'in ket da forañ takenn dour nitrated "bed war bennoù ha taou «Dupont»...

Berr-berr an arc'hant ganin er maroù-mañ, ha dre-se ne gasan deoc'h nemet 150 lur, ha netra ouzhpenn. Ar wech kenañ marteze...

K. Tonnelle



Adlabourat a ran evit ho kelaouenn met fellout a rafe din respont d'an Antrou Alain JOIN -da c'hortoz ur respont all digant va c'henel Ahmed KHEDAM marteze.

Aes eo 'vit an Ao. Join da dagañ an OLP ha da harpañ ar stonagez dre-holl ar broioù arabek, met pezañ a c'hoarvezfe mar abegle un Islamad Breizh ha ma harpfe emzalc'h ar Stad C'hall e broioù ar C'hwec'hogn ?

Farsus eo da welet Bretoned o komz a-zivout gwir ar pobloù da dieubidigezh an dud en o bro, pa z'int c'hoazh pouvezourien kentañ ar Stad C'hall e-keñver trevadennourien, misionerien, ofisourien, kelennerien ha merourien kolonoù an Impalaeriezh Gall. Soñjal a ran dreist-holl el Liban, en Afrika zu hag en DOM-TOM evel-just.

Met petra 'ra four hoc'h aferioù bretoned din-me, a-benn ar fin ?

G.S. Un neubeut bloavezhioù 'zo ec'h embanne Yasser Arafat (war Radio Kaero da skouer) e oa ret lazhañ kement Yuzev, bras, bihan, ha babigoù zoken, a oa war zouar Israel (Chefchet en deus me-noz). Meur a wech e oa bet tud o lavarout hag o klask ober memestra. N'int ket deuet a-benn. Marteze ne oa ket a-du ar Yuzevien... N'eo ket evit kement-se ez on deuet da vezañ sonour ; ar c'ontrol.

Anshel BABEL

SCOLA 89 : KEMENNA-DENN SOUEZHUS

Evit echuiñ gant ken dister a dra, evidomp, da larout eo Salons Europeat an Deskadurezh, aozet gant kêr Roazhon, eo ret, memestra, respont da gemennadenñ K.R.B. ha dreist-holl d'an doare d'ober.

Evit pezh a sell ouzh «on ar gudenn» on a-du ganito, evel-just.

-Gwir eo ; dibab an darvezioù «europeat» gant an li-kêr a zo bruderezh toull ha diouz ar c'hiz.

-Gwir eo ; 4,5 milion a yalc'had a zo ker-ruz, kêr-spontus zoken, gant kement a dud dilabour.

-Gwir eo ; ne seblant ket dilennidi ar C'huzul-Kêr bezañ gwal-chalel gant ar Brezhoneg na gant an divyezhegezh ; lod anezho kentomm o c'halon evit Breizh un neubeut mizezhioù zo, hervez pezh am boa komprenet... (met ar vrezhonegerien a zo genouien anezho evel ma ouzti).

Hogen, pa z'eo feuket K.R.B. peogwir ne ra ket Ministrerezh an Deskadurezh kalz a dra pe re ro ket kalz a arc'hant, pa lar eo d'ar vellestradurezh d'en em ditourñ hec'h unan war gudennoù an divyezhegezh, ne gomprenan ket mul. Deomp-ni Emsaverien da c'hortoz youl vat hor Ministrerezh benniget ha meulet hep rannañ grik, hep ober netra ?? Traou an deskadurezh na sell ket ouz ar Roazhoniz, ouz ar Vretoned ? Evit diwestrañ, ne vefe lozht ebet da sevel ? GEO evidomp ! Ma z'eo an hamez savet falc'put gant an Ti-Kêr, neuze eo un aier all.

Pa lar K.R.B. n'eus «pouez rannvroel ebet ha pal european ebet» marteze, met daoust hag e vo graet un dra bennak berzh Kuzul Rannvro ? Kad «vo K.R.B. d'a lakaat d'ober ? Ma z'eo gwir neuze e stakin em daouarn !

Pa lavar, dreist-holl : «gouenn a ra K.R.B. GANT an HOLL gevredigezhioù a labour evit difenn ha kas ar brezhoneg war-raok chom hep mont d'ar c'hendiviz-se...», n'on ket evit gouzañv seurt «bruderezh», me kennebeut. DIWAN, an A.P.E.E.B. hag a oa bep a stand ganito, hag a zo gwelloc'h er memes lec'h... (a-wechoù e fell da dud 'zo stoum a-gevret ha diskouez d'ar re all n'int ket nemelo o-unan perc'henned war ar brezhoneg, ne zispil ket dezho, zoken, kenlabourat war-zu an memes pal, a-wechoù...). Mistri ar c'hlasoù divyezhek (skol ar Frankiz), hag int emsaverien IVEZ ha n'eo ket tud war o leve, (ma ne gredit ket ac'hanon deuit d'hor sikour), bet aozet panelloù ganito evit un diskouezadeg war an divyezhegezh brezhoneg-gallez, ar c'helennerien brezhonek evit bugale vitan ha krenn, gant skeneroù ; ar c'hevredigezhioù-se, marteze n'int ket ar re «a labour evit difenn ha kas hor yezh war-raok...» ma n'int ket, piv eo ? Ar re a zo soñjezonnoù uhel ganito en o spered hag allou «eus an dibab» ER GER, pe war ar c'helaouenn ? Evel-just an dud-se ne

vo ket saotret o daouarn dezho gant jakonoù nemet miligell... na gant al labour pemdeziek evit bugale o teskiñ ingal dre ar yezh.

War an trakt e lennan : «Ur wech ouzhpenn e vo lezet a-gostez, moarvat, divyezhegezh (brezhoneg-gallez) tud ar vro, kudenn digreizenadurezh an deskadurezh, an taolioù-arnod pedagogel savet e rannvroioù all eus Europa (Katalonia, Kembre...), o zalvoudegezh evit stoum ouzh c'hwitadenn bugale 'zo er skol, talvoudegezh an divyezhegezh abred evit deskiñ yezhoù all. Ma ne vije bet nemet tud an trakt ne vije ket bet, a-dra-sur... hogen bez' oa memestra ! Morse ne oa bet nac'het deomp kemer perzh er salons, zoken ma oa dister-tre ar klas bet roet deomp met, ne vije ket bet un tamm brasoc'h ma vijomp bet an holl o pouezañ asamblez ? En tu all d'ar standoù, d'an diskouezadeg, ur pennad-kaoz a oa gant tud an A.P.E.E.B., DIWAN ha Klasoù Divyezhek war an divyezhegezh brezhoneg-gallez, ha kouvidi o lort eus Katalonia, tud-e-karg an deskadurezh e-touez ar «Generalitat» anezho, hag o deus displeget deomp ar rag hag ar perag en o bro, dirak Bretoned, badaouet gant kement a nerzh hag a Unvaniezh. Ma vije bet deuet tud a c'hâlve da volkotiñ, e vije bet muoc'h a dud er sal o kazaal gant ar Galatoni.

Ya 'benn ar fin, hag evit-se e skrivan ar pennad-mañ, dreist-holl, bez ez eus tu a wechoù da skeiñ ouzh dorioù sparlet ha bountañ anezho evit o damzigor, rak n'eo ket «klas ar mestri» a voe roet deomp, evel-just. Anaf eo ne vo roet netra deomp hep, n'eo ket gouenn, met stoum evit henkaout ha lakaat ar pennoù bras da bleagañ, ma ne vefe nemet un disterrañ, ha da deurel pled ouzhipp, ouz ar brezhoneg. Kalz aesoc'h eo c'hoañ e vez figus, bezañ feuket en araok ha... gortoz en ur vrezhoneg dirak e yenered. Kalz aesoc'h, kalz efedusoc'h n'on ket sur.

N'ouzon ket hag eo DIWAN ha tud ar vugale pe vistri ar c'hlasoù divyezhek tud o pleustrin war ar brezhonek e Roazhon, met ne oa bet gouennel netra diganto berzh K.R.B. A zo gwasoc'h tud o tasparr-hañ traktou evit boiko SCOLA ha tud all (an eil re mignoned d'ar re all) o kemer perzh en ur voadeg pe o «terc'hel» ur stand... evit ar Roazhoniz... sebezho unvaniezh, pebezho nerzh!

Evel da vare ar voadegoù, daou zoare 'zo da stoum ; boikoñ penn-dabenn pe gemer perzh enno en ur flañ traou direizh pe a-enep Breizh... ha ma vefe tu da zivizoù war-se ha da vat kenetrezoamp araok kregiñ ?

An taol imor-mañ ne zeu nemet eus va ferc'h ha n'eo ket en anv kevredigezh-mañ-gevredigezh, met pa labourer benedev evit broudañ, kelenn ha deskiñ brezhoneg e vez, bep a wech, diaes a-walc'h chom displegant.

Ret eo hen anzav, n'eo ket penna-dou «Taol-Imor» ar re blijsañ evidon barzh BREMAN ha koulskoude...

J. DUCHET

DIWAN

XIIvet KENDALC'H KREñVAAT AR C'HELENN



D'an 11 ha 12 a viz Du e voe dalc'het XIIvet Kendalc'h DIWAN e Treglonoù (Leon). Ar pouez a oa bet lakaet war ar c'helenn. War gresk ez a niver ar vugale skoliataet gant DIWAN. Un dra vat eo evit ar gevredigezh evel-just ; ur c'hresk diaes da verañ eo avat. Bep bloaz e vez digoret skolioù ha klasoù Brezhoneg ouzhpenn ; ret eo da ZIWAN kaout kelennerien nevez, deskiñ dezhe o micher... Ret eo ivez krouiñ ar binvioù kelenn ; levrioù, fichennoù... Diazezet eo DIWAN war daou dra : ar Brezhoneg hag ar bedagogiezh.

D'ar bedagogiezh eta e oa bet gouestlet al lod brasañ eus divizoù ar c'hendalc'h. Disorc'hoù a oa deuet 'maez eus an divizoù-se ; setu anezhe :

- kreñvaat ar frammoù pedagogel : post ar rener war ar c'helenn, ar c'huzul pedagogel, ar skipailhoù kelenn...
- kelenn saozneg er c'hentañ derez.

Ur c'hendalc'h gouestlet d'ar bedagogiezh e oa hemañ eta, padal n'eo ket diskoulmet evit kement-se kudenn an argant hag hini an darempred gant Stad C'hall. Mont a ra war-raok ivez war an dachenn-se. Kuzul Departamant Penn ar Bed en deus asantet kemer e karg an drederenn eus dle DIWAN d'an URSSAF ; al lodoù all o vezañ kemeret gant ar c'huzul rannvro hag an departamantoù all, ar pezh n'eo ket graet c'hoazh.

Ha pa vo diskoulmet kudenn an dle gant DIWAN, ne vo ket renket kalz traoù avat. Keit ha ma vo ket roet da ZIWAN peadra da vont en-dro : gopr ar skolaerien pa ne ve ken, e chomo atav kudennoù argant. Stag eo an dra-se eveljust ouz an darempred gant stad. Ne faot ket da homañ betek bremañ anavezout ouz an darempred DIWAN, padal emañ e pouez hen ober evit SEASKA, ar skolioù Eus-sistem kelenn DIWAN, gant emañ e pouez hen ober evit SEASKA, ar skolioù Eus-sistem kareg, hag ay a en-dro dres evel ma ra DIWAN. Gwir eo n'eo ket pouez emsav Breizh ken kreñv hag hini Euskadi pe hini Korsika, sellet ouz ar C'HAPES korseg (7 post) hag ar C'HAPES Brezhoneg (1 post). Kompren a ray ar Vretoned, emichañs, ar pezh a chom dezhe da ober. ■

Dominig Jolivet

TRO AR SKOLIOU : Ur paouez a reomp en niverenn-mañ, a-benn ar mix a zeu e vo kinniget deoc'h skol Sant Brieg.

NAONED E BREIZH

MANIFESTADEG : 400 A DUD

Ur stroudad 150 karr a oa o tibunañ e kêr Naoned, kêrbenn Breizh, d'ar sadorn 18 a viz Du, da c'houlenñ e vije adunanet Breizh, 400 a dud eta (250 hepken gouez d'ar c'hazalennoù pemdeziek) o doa respontet d'ar galv embannet gant CUAB. Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg hag un toullad aozadurioù all, en o zouez an AEMB (Kevredigezh Dilennidi Tiez-kêr Breizh) stank enno izili UDB, ha tud skol Diwan Naoned. Gwellout a c'halled ivez gitoriou gant tud eus Pobl, MIB hag Emgann. Dileuridi eus KRB a oa ivez.

Dirak an ti-kêr...

Goude un tamm arsav dirak Rector-di Naoned ez eas ar vanifestaden d'evet an ti-kêr en ur stankañ an dremenneri. Eno e voe prezegat gant Jean Cevaer, prezidant CUAB, a lavaras ne oa nemet Breizh unvan a c'helle bezañ krefv a-walc'h da gwezañ gant rannvroioù europat bras all evel Katalonia, Luksembourg pe Lombardia, ha ne oa ket ar «Grantoues» un diskoùl gwelloc'h eget hini ar «Peydeuloar».

Lavarout a reas ivez Stefan Moal (UGB), Sant Nazerad ha kelenner brezhoneg e Kemper, e oa ur vevh gwelout e veze aesoc'h deskiñ brezhoneg e skolioù Pariz eget e Bro-Naoned.

Dont a reas neuze Patrick Mareschal, kuzulier e ti-kêr Naoned ha bet prezidant CUAB da zisklêriañ ne c'halle ket kêr Naoned divzout diwar-benn kudennoù a denne da bolitikezh ar gouarnamant. Un emgav gant dileuridi eus an ti-kêr a voe kinniget da 6 eur.

...hag ar C'huzul Departamant.

Da c'hortoz e kerzhias lod eus ar vanifesterien betek ti-kuzul an departamant, hag ar c'hinn d' o heul, en ur huchal luganoù brezhonek ha gallek (Naoned e Breizh! Peydeuloar-foutoar! Hag all...).

Eno e komzas Tugdual Kalvez (UGB) a lavaras e oa an trec'h e penn ar stourm. «Ret e vo, emezañ, diskenn adarre war ar straedoù, herzel trenioù ha kinn-hij ha stankañ hentoù ma fell dimp bezañ klevet!»

Echuñ a reas an abaden gant kan broadel Breizh hag hini an ARB, tra ma oa ur banniel Peydeuloar o leviv.

Ha goude ?

En emgav roet d' an aozerien gant an ti-kêr e voe goulennet digant an dilennidi

pouezañ war ar rektor evit ma c'halle kelenn hor yezh mont war-raok er skolioù-stad koutz hag e re Diwan. Prometet e voe oberiañ war an tu-se ha kas war-raok ar c'hel-labour etre Naoned ha Kerioù all Breizh.

D'an 29 a viz Du ivez e tegemero Rector Naoned dileuridi eus UGB.

E miz Genver e vo bodet CUAB e kêr Redon da studiañ an arzaadennoù gouezet, ha, spi a zo, da gas war-raok an ober ret da dizhout ar pal.

En ur gemennadenn kaset dimp gant KRB e c'houlenñ an aozadur-se e aozfe CUAB ur vanifestadeg vras kent dibenn ar goañv gant «ar muiañ a strolladoù ... ar gwellañ». Kinnig a ra KRB sevel manifestadegoù «e Bro-Naoned, Sant Nazer, hag ar Roc'h Bernez». (Mar bez aes stankañ ar pont eno e ve ken aes all stankañ pont Ansiniz, a-dal da Vro-Chall, keta?). Goulennoù KRB digant an holl re a stourm evit Breizh krefv en Europa ar Rannvroioù (?) mont e darempred gant ar c'huab hag UGB evit bountrañ war an tu-se. Bec'h dezhi ta !



«Teurvezit ma kroglenn gant ma zammig buhez : mard on bet dilennet gant ma c'hellen eus Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg evit prezegenn hizv, ez eo abalamour din bezañ mab eus ar vro-mañ, Bro Naoned pe Liger Atlantel mar kavit gwelloc'h, peogwir on bet desavet e brezhoneg hag e gallek e Ledenez Gwennrann. Gant Roland Mogne, eus Naoned, eus Naoned, e oamp bet e-buez ar c'hentañ kelennerien da gaoz ur C'HAPES brezhoneg : penaos diskouez splannoù'h ez eo ar vro-mañ hag an dud o chom enni breizhet penn kil ha troad ! ma zad din a zo just awalc'h unan eus ar re nemeta a vez aotreet c'hoazh da gelenn brezhoneg en e skolaj.»

Rak peseur plas a chom en deiz a hizv gant kelenn hor yezh e skolioù Bro-Naoned ? Un nebeut eunvezhioù e Sant Nazer hag e Naoned, gret peurliesañ gant kelennerien a youl vat, pe war o leve zoken. Tamm skol bubik divyezhek, takenn ebet a vrezhoneg zoken e-barzh skolioù kentañ an departamant, er skol-veur hec'h-unan, hag hi an hini goshañ e Breizh, eo aet da get ar c'hentelioù brezhoneg a oa. Ha degas soñj a ranker ez eus koulikoude kentelioù brez-



honek e skolioù meur New York, Tokyo, Bruxelles, Tübingen, Galway, Kairo, hag all, ha betek e Pariz ma vez ivez kelennet ar brezhoneg er skolioù ha liseoù war daou bost budjet da nebeutañ.

E kêrbenn duged Vreizh, netra ! Ne chom war sav nemet ar skol Diwan e kreiz an dismantrou-se, skoazellet ma z'eo gant ur c'huzul kêr digoroc'h e spered eget hini ar galloud akademek... pe dieuboc'h hepken!

Peseur abeg da gement-mañ ? E Breizh-Uhel emañ Naoned ; Roazhon a zo ivez, ma kaver eno ouzhpenn ur skol Diwan, klasoù divyezhek publik ar c'hentañ hag an eil derez, brezhoneg er skolioù prevez, ha dreist pep tra ur gevrenn gallek er Skol Veur. Evit galloudoù an deskadurezh er rektorelezh-mañ, a zeu o urzhioù war-eeun eus ar gouarnamant e Pariz, n'emañ ket Naoned e Breizh, ha biskoazh n'eo bet, ken aes ha tra kastell an Duged, anvioù evel Kerfaou, ar Pouligwen pe ar Groezig, disoc'hoù ur goulennadeg gret gant FR3 hag ESCAE n'eus ket ken pell-se hag en doa diskouezet splann ez aed gant stagañ peurlies Breizh ouz ar penn-kêr, kement-se holl a vez skubet kuit gant dispriz. Hen lavarout a ran adarre, aesoc'h e vo da Vreiz-

hiz Pariz kaout kentelioù en o yezh eget d'ar re a zo chomet er vro, e Naoned. Ne c'hell den ebet eilpennañ o lavaroù n'eus ket a choulzennoù evit seurt kentelioù, pa ne vez ket klasket hen gouzout zoken, ha pa vez gret skouarn vozar gant rektorelezh Naoned ouzhi lizhiri rektorelezh Roazhon a-zivout an dra-se.

Tremennoù eo e c'hefliche penn d'ar vazh ar galloud akademek, ha da ne vefe evit mirout ouzhi traoù dispius da c'hoarvezout hepken, a-seurt gant pezh a oa c'hoarvezet gant Palez ar Rannvro warlene. Evit diskouez o bolontez vat eo c'hellfe renerien an akademiezh-mañ envel ur c'hellenner gantañ e GCPES brezhonek war ur post e kêr Naoned, pezh e vez Roland Mogne o c'hortoz kaout bep bloavezh abaoe pevar bloaz. Hogen, muoc'h eget un arouez a fell deomp kaout : ret eo lakaat war-sav ur framml klok evit kelenn ar brezhoneg e Bro-Naoned ; niventiñ an ezhommoù, er c'hentañ hag en eil derez, hag ivez evit digeriñ klasoù divyezhek ; stummañ skolaerien ; envel kelennerien war postoù savet a-ratozh evit ar brezhoneg ; adsevel an UV brezhonek er skol-veur Naoned gant ar pal da grouñ a-benn nebeut ur gevrenn gallek penn da benn, eus an DEUG betek an doktorelezh ; skoazellet pedagogel hag arc'hant evit DIWAN.

Enebourien daonet ur rannvro unvanet war an dachenn ekonomikel ha politik a rank anavez forzh penaos personelezh breizhet Bro Naoned evit pezh a sell ar sevenadur, evel m'hen doa anavezet karta Sevenadurel Breizh ur mare zo bet. An hent bouc'het e Korsika nevezig 'zo gant reñtañ-kont an Ao. Arrihig de Casanova roet da c'horsikaneg e pep lec'h hag e pep live war an enezenn, an hent-se a vo kemeret gant an daou departamant Korsikan a-gevret. Pa vo bouc'het an hent-mañ e Breizh, hag e lele bezañ gret, kent pell amzer ma ve un tammitig poell gant ar Stad, arabal kroc'h e chomfe Naoned sac'het war-lerc'h Roazhon. Kerkent hag ar bloaz-mañ e ranko an daou rektorelezh kaniabourat evit diskouez ur youl politik a-du gant kelenn ar brezhoneg. Ni, Unvaniezh ar Gellennerien Brezhoneg, ha kalz tud all ivez, emañ e Breizh hag e lec'h all, a chomo war evezh.

Trugarez deoc'h.

Stefan Moal, ezel kuzul-Merañ U.G.B.

Prezegenn digoradur dirak ar rektori, Naoned d'ar 25 a viz Du 89.

GWASKEREZH

MUNTR

EUSKADI



Comentariou Josu Muguruza

EGIN, kazetenn bemdeziek broadelourien Euskadi, goude d'e genrevr Xabier Galdeano bezañ muntret gant ar GAL e 1985. Kelenn a rae ivez an euskarreg gant AEK.

E 1987 e voe kaset gant ar bolis c'hall da bolis spagn. Boureviet, toullbac'hel, lezet da vont hag ad-toullbac'hel e voe neuze.

Deuet e oa da vezañ embanner EGIN.

Kaŋv

Meur a zek mil den a oa dimerc'her 22. e straedoù kêr Bilbao, da heul arched Josu. A-hed an ambragadeg edo an engroez o huchal luganou-skaozell da ETA.

«Aet e oamp da Madrid da gomz eus peoc'h, eme Jan Ildigors, kannad eus H.B., ha setu ni deuet en-dro gant korf marv Josu.»

Diskrogu-labour a oa e pep lec'h dre ar vro. E Breujoù-Spagn e voe ur vuru-tenn a beoc'h en evor da Josu, ur farsadenn pa soñjer e oa bet klasket gant tost an holl strolladoù, ha PSOE Gonzalez da gentañ-penn, mirout ouzh tud H.B. da vont da gemer o lec'h er c'h-Cortes.

Hervez an enklask-polis e teue ar boledoù tennet war Ifaki ha Josu eus labouradeg armou evit an arme. Embannet en deus «Emgann» e genskoazell da «Herri Batasuna» en degouezh kaŋvavus-mañ.

A.P.

Ur stourmer

Anavezet e oa Josu Muguruza gant Bretoned zo o doa gallet e zarempredañ pa oa repudat politikel en Euskadi an Hanternoz, e-lec'h ma labourer evel kazetennere evit

PRIZONIDI

1 e-barzh 1 er-mae

Ma z'eo bet lezet da vont Jean-Yves Meudeg e dilenn miz Here e chom Gilbert Kabon en toullbac'h, nac'h a ra ar barnar selaou anezhañ dre ma leli Gilbert komz Brezhoneg, evel ma ra abaoe m'eo bet harzet, evel m'en doa graet dirak politserien Brest e miz Mezheven.

DILENNIDI GANT KABON EVIT AR BREZHONEG

Un toullad mat a zilennidi (ouzh-penn 300) o deus skrivet da vinistr ar «justis» da c'houlenn ma vefe adreter Kabon da gomz e yezh, hag e varner da zibab ur jubennour etre 80 a dud a zo en em ginniget d'e sikour. Ouzhpenn dilennidi evel Arzel ha Cozan (UDF), Tremel, Dollo ha LeDriant (PS), ha Cochet (Re C'hlas) ez eus bet kuzulioù-kêr o vouezhiañ kemend-all, evel re Vrest (a-unvouezh !), Kemper, Konkave, ha Goulin. Ha nevezik zo Kuzul Departamant Penn ar Bed a-unvouezh !. Biskoazh n'en deus bet Kabon kement a vignoned. Siwazh n'int ket gwall etedus !

KABON E BREIZH

Rak e-keit-se e chom disebiant ar barnar partizan Vulliezin ouzh mouezh dilennidi pobl vreizh : abaoe an 30 a viz Gwengolo n'eo ket bet o weler Gilbert en toullbac'h e Fresnes.

E anv en deus lakaet Kabon evit an DEUG brezhoneg. Met nac'h eo bet reñt dezhan ur gellig studier. N'eo ket un danvez-studi ar Brezhoneg !

E broioù reter Europa e weler an «Intelektualed», ar generien, ar skrivagnerien, ar gelennerien skol-veur, o tilenn gwirioù-mab-den. E Breizh e c'horfotzed an holl re a gan, a skriv, hag a gelenñ Brezhoneg d'ober kement-all, da lavarout eo, da savet o mouezh da zifenn gwirioù UN DEN a c'houzañv en abeg d'e yezh, ar yezh-se end-eeun a labouront ganti hag a vevont anezhi.

Da c'hortoz an dihun-se, e c'hall pep hini kas un tamm lizher da Gilbert Kabon : 7940 48W, 119 avenue des Thuyas, 99261 FRESNES.

Bez e c'hallit ivez pellgomz d'ar gwener da noz, da 9e45 da Radio-Bro, a skingaso ho kaliv. (16-1 47.61.00.75) ha kemer perzh er c'huzulioù skaozell (Kreizenn Penn ar C'hreac'h 29200 BREST)

KEMENNADENNOU

KEMENNADENN

Kuzul meur P.O.B.L. bodet e Redon d'an 22 a viz Here en deus merzet ur gwall-ober, unan ouzhpenn, a-berzh ar stad jakobin a-enep mad ekonomikel ar strolladoù gall e Breizh war gement-se.

Ar «Banque de Bretagne», war urzh espres an Elysee, a zo bet roet d'an hini jakobinañ eus ar bankoù-stad : ar «Banque Nationale de Paris», ha kement-se en desped da heñtad an implijidi, en dije felet dezho kaout un diskoulm breizhek.

Un dro-gamm ouzhpenn a-berzh ar «rannvroelien» a-enep al labourerien hag ar Vretoned dre-wras !

Implijet 'vo arc'hant ar Banque de «Bretagne» d'ober kampi evit ekonomiezh ur bank eus Bro-Bariz a ra fae war dazont Breizh pe war ar Vretoned, n'eus nemet sellout ouzh aler Yves ROCHER.

Labourerien ar bank a felle dezho mont daveit ur leur-emplev, gant ar «CNR-dit Mutuel de Bretagne». Nac'h o deus ar jakobined dre ma veze re a vankoù kenlo-dennek (mutualist) e Breizh, ha re a c'halloud ganto !!! Iksik memestra gwelout ur gouamant sokialour, a-hervez, o ware-zif bankoù ha kampi kapitalour ?

*gav ket deoc'h ?

Neuze e vo ret da bep Breizhad lemel e arc'hant diouzh ar B.N.P. ha diouzh e adstaliou.

E-giz-se e vo enbriet ouzh seurt bolontezioù-se a galsk n'vinañ ar Vro evit brasañ gouind an lideufarñs ha Kerbariz.

Hiziv eo ret sourm, warchoazh e vo re ziwezhat !

Burev P.O.B.L.

P.O.B.L. Demokratiezh Breizh a gas e c'hourennoù a galon d'an Ao. PÉÑ-NEG Is-Maer Gwengamp evit bezañ lakaet da sinañ ganti kuzulierien e gêr ur mennad o c'houlerien groñs ar gwit da gomz en e yezh : ar Brezhoneg ! evit ar prizoniad politikel breizhat, Gilbert Kabon, bac'hel e Fresnes (Bro-c'hall) adalek d'erou miz Even.

Fellout a ra da b.P.O.B.L. degas koun eus an droed evit pep keodedour da gomz ar yezh en deus dibabet, zoken ma z'eo unan implijet gant «minelezhioù» zo er C'hwech'kogn. N'eus ket pell 'zo c'hoazh, barnerien ar Stad C'hall a ra dre sikour jubennourien Brezhoneg-Galleg.

Evit pezh a sell ouzh gwall-anv eus «gwall-oberourien» diwar-benn G.KABON ha J.Y. MEUDEG, e c'houlenñ P.O.B.L. ma vo embannet spiann ha fraezh ar perag eus an alennoù a voe bac'hel an daou emsaver evito a-hervez, ha lakaet war wel en un doare sklaer ABEGOU an-oberioù-tamallet dezho, ma z'eo an oberioù-se !

Evrus ha laouenn omp, memes tra, ma vo adroet ar frankiz da J.Y. MEUDEG, en ur c'houlenñ dieubidigezh e goulstourmer diouzhti !

Burev P.O.B.L.

Renner an Unione di Populu Corsu (UPC), dilennet e Breujoù Europa evel kannad ar «minelezhioù» er C'hwech'kogn, da larout eo Max SIMEONI, en deus helet e komzle an Emsav a-unvouezh. Kinniget en deus evit-se ma vefe aozet (eñ o vezañ ganeomp) un emgav etre P.O.B.L., EMGANN hag U.D.B.

A-du 'vele P.O.B.L. evit-se, ken anat evidom e vefe pouezus divizoù war dra-mañ dre rann a-walc'h hag etedus evit an dazont (evel pemp kinnig diazezh evit dazont Pobl Vreizh a-berzh EMGANN, da skwer.)

Betek bremañ ne vefe nemet EMGANN o klask mont e darempred ganeomp ha prest e vele Kuzul-Ren P.O.B.L. d'ober un tamm mat a hent ganto ... hogev war a seblant, U.D.B. diouzh he zu a vefe prest d'ober kement-se hep P.O.B.L. !!! Diaes a-walc'h kemer penn an hent e-giz-se Daoust ma vefe ret d'hen ober buan, ma ne vefe nemet evit diskouez d'an emsaverien all, hag int o c'hortoz, eo deuet ar strolladoù politikel d'o oad ...

Keit ha ne vo ket tu mont e darempred holl a-gevret, ha n'eo ket pep hini diouzh e du, e vo dibosub evit P.O.B.L. mont pellhoù ... Lizzhi a zo bet kaset da Simeoni, da EMGANN, d'an U.D.B. war ar poent-se.

Da vezañ kendalc'hel ...

Burev P.O.B.L.

DISKAL AR VOGER VELESTRADUREL

D'an 18 a viz Du e Naoned e oa ouzhpenn 300 den evit degas da soñj pegen malus eo adurwandigezh Breizh ha kalennadurezh ar brezhoneg el Liger-Atlantel.

Kemeret en deus perzh Kenemglev evit Rannbarzh Breizh gant kred er vanlestadeg-se hag a ziskouez d'erou diskal ar voger velestradurel. C'hoant en deus neuze K.R.B. e striv'e ar C'HUAB a-benn savet ur vanlestadeg veur diwar-benn ar memes krefen e fin ar goañv-mañ, en ur lakaat da gemer perzh ar muiañ a gevredigezhioù ha strolladoù politikel ha sevenadurel breizhek ar gwellañ, an aozadurioù kelennerien ha studierien.

Hervez ar palioù embannet en e program en deus gouennet ar Burev digant an dud e karg eus Kuzul KRB-CRB Naoned preñtñ al labour-se. Kinnig a raio ar c'huzul-se ur vanlestadeg e Bro an Naoned, Sant Nazer, hag ar Rôch Bernez.

Gouennet a reomp ganti an holl re a stourm evit savet Breizh kreñv an Europa ar Rannvroioù mont e darempred ganti ar C'HUAB hag Unvaniezh ar Gelennerien evit boutañ war an tu-se.

K. R. B.

BEP DAOU VIZ LENNIT

AL LANV

59, hent

KERDORNIOU VIHAN

29000 kemper

KOUMANANT BLOAZ 70 lur

SKOAZELL : adalek 100 lur.

Klevout a raer forzh pegement diwar-benn Bro Alamagn hag hec'h adurwandigezh da zont marheze. Ken ez eus bet ankounac'haet, en lousnac'h-se, menegeri e oa d'an 9 a viz Du 51 vet dezhañ bloaz «Nozvezh ar Strik», penn-kentañ lazha-deg veur ar Yuzevien ganti an nazied.

Ho pet soñj anezho.

Anshel Babel

Burev P.O.B.L.

BARZHAZ BREIZH

WAR AN TON BRAS

Leun-kouch e oa sal vihan mirdi breizh an Departamant e Kemper evit kinnig kentañ ar film «BARZHAZ BREIZH» : c'hoazh hag adarre» ar yaou 16 a viz Du. Aergelc'h nozvezh an oskar. Alain Bienvenu o c'hoari roll ar chinger, prop ha kempenn. Brav e teu ar galleg gantañ, Mikael Baudou e toull an nor. Hag ur bern eus an arzoerien o deus kemeret perzh er film ha teknisianed o deus savet anezhañ : Youenn Gwernig, Jean-Luc Roudaut, Yann-Fañch Kemener, Gilles Servat, Andrea ar Gouilh, Naig Rozmor, Jean-Christophe Bozop, Youenn Kraff, Fawal ar Menn, Laurent Jouin, Sylvain Kernea, Noémie LeBris, Dan ar Braz...

Ar skouerenn c'hallec eo a zo bet diskouezet. Da lavarout eo ez eo, pe doubet, pe is-tilet ar c'homzoù. Komzoù ar c'hanaouennoù avañtini ket troet. Ur c'hem-pouez mat a gaver eta etre an ezhomm da lakaat da gompren an oberenn ha d'erehel ganti blaz an orin. E saozneg hag en alamaneg e vo troet ivez.

An oberenn vrezhoneg penn-da-benn a zo bet kinniget war FR3 Breizh d'ar 26 a viz Du. Bourusoc'h kalc eo d'ar brezhoneger, a goll un tammig eus e bijadur pa glev Kervarker o komz galleg.

Donatien Laurent a zo bet o c'h alliañ saverien ar film, hag a wele anezhañ evit ar wech kentañ, «en deus dizoloet penaos e oa ar «Barzhaz Breizh» un oberenn eus an amzer a-vremañ dre an arzoerien o deus kinniget anezhañ.»

Trugarez da FR3 Breizh da vezañ kinniget ar film-se da geñver 150vet deiz-ha-bloaz embannadur kentañ an oberenn veur. Dedennus e vo gwelet penaos e vo degeret er broioù estren. A dra sur, un hent evit an da-zont a zo gant FR3 Breizh o sevel seurt abadennoù. Trugarez ivez da Dirk Sanders en da lenner ar «Barzhaz Breizh»



Deuet e oa ivez maer an Uhelgoad. Ar barzh hollvrudet Kouiliz Kedez a oa eno, nepell diouzh Yann Brekilien. Tud veur dre holl. Hep disorjal Prezidant Diwan, Youn Bodenneg hag ar rener nevez Ronan Tremel, ar prezidant kozh, Andre Lavanat, rak, gant Annaig Baillard a ra war-dro embannadurioù al «Lagon Bleu» ha gant FR3 eo bet kenmbannet ur bladenn lazer hag ur c'hasedig diwar ar film, a yelo gounid o gwerzh da skolioù Diwan.

E MEUR A YEZH

An aozer Dirk Sanders, aozer brudet an abaden «Champs Elyses» a oa bet dihechet e garr-nij war an Onant ha ne zegouezas nemet er lin. Rak, evit gwir, setu ur film a ra enor da Vreizh, d'ar «Barzhaz Breizh», d'an arzoerien o deus c'hoariet e-barzh ha da FR3 Breizh evel just.

ARZOURIEN VRUDET DRE AR BED

Am-partiz-micher Dirk Sanders, kizidigezh ha barregezh an arzoerien, kened barzhonegoù ha tonioù ar «Barzhaz Breizh» a ro deomp un eurvez c'hwec eus ar c'hentañ : birvilh hag enlani gant Gousperou ar Rened Rêve de Gosse, from mouezh Yann-Fañch Kemener, Andrea ar Gouilh ha Youenn Gwernig, nerzh don Gilles Servat, ijin hag awen Roland Becker hag ar strolladoù E.V. kempennet ganto an tonioù en un doare modern. Hag a bep tu diavezou kaer meurbet ar vro, ar mor, ar menezioù pe ar savadurioù. Buhezec eo ivez an doare m'eo c'hoariet taolennoù eus buhez ha labour Kervarker etre ar gwerzhioù a bep eil, daoust ma z'ous poan, a-wechoù, da disorjal ar c'hoariet a zo a-dreñv d'an dudenn pa anavezet anezhañ re vat dre abadennoù Chadenn ar Vro. Gouzout c'hoariet rolloù dishevel, aze emañ an dalc'h ivez.

en droidigezh izelvroeg evit kompren spe- red gwerzhioù pobl ar Vretoned.

T.L.

KILAQUINN
Kazennet diennet
brezhoneg - galleg

36-15
TC / KELA

- Kelenner ar vro
- Gouzout, Fentoù nea ...
- Lervioù nevez embannet
- Skol Uhel Ar Vro
- C'hoarioù

BARZHAZ BREIZH

Prezegennou, diskouezadegoù, abadennoù kan ha sonerezh a vo bet un tamm e pep lec'h evit lidañ 150vet bloavezh embannadur levr Kervarker. Ret eo bet gortoz miz Du avat evit kavout pladennoù nevez war ar marc'had.

A-berzh «Dastum» hag «Ar Men»

D'ar Gwener 17 a viz Du, e Mirdi Breizh, e Roazhon, e lide **Ar Men** ha **Dastum** kenembannur o fladenn-gompakt diwar-benn Barzhaz-Breizh «Tradition chantée en Bretagne. Les sources du barzhaz Breiz aujourd'hui». Klevout a reer enni kanerien a bep korn a Vreizh-izel o kanañ hag a c'hallec bezañ stummoù orin ar re a gaver e lavr Kervarker. El levrig kevret e kaver komzoù brezhonek ha troidigezhioù gallek ar gwerzhioù enrollet gant tud kozh (ar c'hoarezed Gwadeg, Manu Kerjean, h.a.) koulz ha gant re yaouank (Kemener, Marchand, Annie Ebril, h.a.). Mouezh Marc'harid Fulup (enrollet e 1900 gant Vallée) a glever ivez.



FR3 : Ur film hag ur bladenn

War un dro gant ar film e kinnige ar gevredigezh «Lagon Bleu» (renet gant ur verc'h da Youenn Gwernig) ur c'hasedig hag ur bladenn gant gwerzhioù ar «Barzhaz». Gontid gwerzh an traoù-mañ a vo roet da Ziwan.

Alan Promeune

Meuleudi a vo kanet d'al labour gwernonezh-mañ kaset da benn gant Patrick Malrieu ha Donatien Laurent, daou arbennigour, an eil war hor sonerezh-pobl, egile war oberenn ar beskont. Ar brezhoneger figus a zo a c'hanon a garje bezañ gwelet yezh ar gwerzhioù enoret betek war golo ar voest hag hini al levrig. Met n'eo ket gant ar spered-se, war a seblant, o deus labourer an embannere.

D'ar sadorn 18 a viz Du, e Kemper, edo FR3 Breizh o kinnig ar film savet gant Alain Bienvenu ha Youenn Gwernig diwar-benn «Barzhaz-Breizh». Gwelout ha klevout a reer ennañ a bep seurt tud o kanañ gwerzhioù levr Kervarker : Andrea ar Gouilh, Yann-Fañch Kemener, Gilles Servat, E.V., «Rêves de Gosse», al laz-kanañ «Chorale du Bout du Monde» ha sonerezh amezev a bep eil.

* Pedet e oa bet skipailh Bremañ da lidañ an daou embannadur-se. Diwar an div gartenn-bedif kaset deomp e oa unan di-yezhek : hini FR3. Eben a oa e galleg.

AR VRETONED HA DOUE : HAG HOR YEZH ?

Gant ul lenner eus Barcelona (trugarez dit, Jordi) hon eus bet ur pennad, kavet gantañ er gazetenn gataleanez pemdeziek **AVUI**, diwar-benn un diskouezadeg e Pariz : an hini savet gant ar gevredigezh «**Buhez**» (en he lenn Yann-Cheun Veillard, rener mirdi Breizh Roazhon ha bet unan eus tadoù UDB), ha skoazellet gant **Skol Uhel ar Vro**, diwar-benn «**Ar Vretoned ha Doue**».

Echuñ a ra ar pennad (hir a-walc'h) evel-hen (an droidigezh ganimp) : «Met an diskouezadeg-se, a zo dedennus-tre pa zispleg kudennoù ar politikerezh hag ar vroa- delouriezh. Da skwer, n'eus tamm dave ebet d'ar brezhoneg an diskouezadeg (pa z'ous ouzhpenn 300 a draoù, dielloù skrivet pe skeudennoù enni *) p'o deus labourer pe beleien Vreizh kement ganti atav (!). Ar rebech nemetañ a c'haller ober d'an diskouezadeg outiek-mañ eo. Er stad CHall

kreizennet dreist n'halle ket bezañ en ur c'hiz all».

Evel a weller, pell emaoamp amañ eus ar pennadoù meuleudi d'al da zo bet lennet er c'hazetennoù gallek, pe brezhonek zoken, en hon bro. Ret e vo mont bremañ da gask er c'hazetennoù katalanez ar pennadoù barn diwar hon sevenadur n'eus ket tu da gavout e Breizh. Amen.

Yann LESKILDRI



BERR HA BERR

CHEŃJAMANTOU ER RETER

Pa glevet media ar C'hornog oc'h ad displegañ an emdroadurioù politikel e broioù komunour Europa ar Reter, e klevet war ar memes tro a bep saout «diellennadurioù neptu» o kevezañ e-keñver manikegezh luoc'h-luan.

Penaos chom hep bezañ fauket o klevout tud siek oc'h enebñ komunouriezh ha demokratelezh evel ha pa velent traoù digenglotus penn-da-benn.

Onestoc'h e vefe ober an diforc'h etre ar gomunouriezh evel ideologiezh politikel rediet da cheñj ha da gloc'h gant an obererezh hag an en-dro a gav tro-dro dezhi, hag an doare, arvarus a-wechoù, strizh a-wechoù, ma oa bet lakaet da dalvezout, onestoc'h eget lavarout ez eo tonket da vezañ fall a-berzh Doue. (Padal he deiz kalzig a gentelioù a zemokratezh da reiñ d'he abegerien).

Piv a gredfe c'hoazh awenañ menozioù liberal hiriv an deiz war-eeun gant skridoù Smith pe Ricardo ? P'he deus d'ober gant he c'hudennoù mont-en-dro, he c'hudennoù a gevredigezhioù strizh, he diaestrioù ekonomikel, em dro ar gomunouriezh da cheñj, pe diwami hec'h-unan evel en URSS, pe diwar lusk menozioù ar pobloù dedenneloc'h gant Gorbachev eget gant Thatcher, Bush pe Mitterrand.

Fiñval a ra ar gomunouriezh, ha diskouez dre se he bevusted... er C'hornog avat, netra nevez !

Jules Schier

BREIZH N'EMAÑ KET DA WERZHAÑ

Luganioù saoznek (BZH not for sale) ha gallek zo bet livet war diez notered ha gwerzherien-tiez e Kallag, Lannuon ha Gwengamp. Torretez eus bet dorioù ha prenestroù e ti Philippe ar Gov, noter e Kallag. E vit Ouest France Gwengamp e oa kement-se oberoù «ksenob». Aesoc'h da lavarout eget klask kompren e c'hall tud zo fulorin, pa welont priz an tiez o vont war grech pinvidien diavaez-bro. Ar re nemeto o c'hallout prenañ anezho. Met an dud-se, ma ne bij ket dezho an douristelezh a zilenn ken brav O.F., a c'hall divroañ bepred, kela ?

Anshel Babel

FLIP-FLAP
Ha gwelet ho peus dija abadenñ «Tavarn ar Vretoned» e-pad Chadenn ar Vro d'ar sul ? Kregin a ra mat atav : «ha bremañ emaoimp o vont da adkavout ar strollad onkerien mezhus-se...». Diouzhtu war-lerc'h ech adkaver un nebeut plieroù tavarn ouz ar bar -ha n'oc'h ket skuizh c'hwil o welout Sylvain Kermao gant e rol a gozh plouk reak ? hag alav un tamm abosol-bennak oc'h ober e samont diwar-benn tra pe dra : ar boeson, ar chase, ar modernizaf kenoù binan... Ar wech all e oa Youenn Gwernig e stum ur sant (Sant an Dour) ha Naig Rozmor e hini an douez Divona, hag e fin an istor e oa trec'h an hengounioù kozh war ar falsmoderniñ o islebeñ ar vro kaer... Vit an abadennoù all, n'am eus ket re a soñj. Pezh 'zo mat atav, ma ne gaver ket kalz a zidumant en abadennoù-se, d'an nebeutañ ne vez ket soursiet ar spered ganto. Al Eof Soñj am eus bezañ gwelet Naig Rozmor treuzwisket e doare ul lapinez. A-wechoù e talvez ar boan chom hep staniñ er gwele memestra.

Anshel Babel

G.S. Hervez FR3 Breizh-PDL : « Cette série traite au zoom de la rigolade tous les événements et les tourne en dérision ». Al

Safiset (Bremañ niv. 98) e oa bet skarzhet ar gevredigezh Oaled Sant Erwan eus loar gouel Sant Mikael e Brest ? Pagen souezhus ! Perak n'int ket aet ivez da cheñj anv : Oaled Sant Van Perrot da skouer.

ROAZHON : d'ar Meurzh 5 a viz Kerzu ez eus bet un diviz diwar-benn lennegezh Ivezhon gant ar skrivagner saoznek Sebastian Barry, hag ar re ouezelek Nuata Ni Dhonnaiill ha Breandan O'Heithir, er FNAC.

Setu amañ lusk-skudenn ul lizher am eus bet nevez zo digant Gouarnamant Bro-Gatalunya ; skrivet em boa dezho, e Katalaneg, evit klamm ne veze ket meneget ar brezhoneg hag ar c'hembrag e-touez yezhoù Europa (war ur gartenn e-barzh al levrig roet d'an douristed war ar «gCosta Brava»).

Brav eo ar respont, ne gav ket dit ?

Dizale e respontin, e Katalaneg ivez ma n'eo ket re ziaes, evit o zrugarekaat.

A galon gant !

B.Kadoret

Aotrou ker,

Evit respont d'ho lizher e rankan lavarout deoc'h siwazh emañ ar gwir ga-neoc'h. Chalet on e vefe bet disoñjet an dra ho peus merzet. Gwelet hon eus ar fazi pa oa an dresadennoù o vezañ moulet. Gelouf al rit bezañ sur e vo reizhet ar bloaz a zeu.

E darempred emaoimp gant tud hag a ra war-dro ar yezhoù nebeutoc'h komzet evit gellout mont war-raok war an dachenn-se. Da skouer ez eus bet resevel ganoimp un nebeut devezhoù zo ul levrig war kastell an duket e Breizh, gant an festennoù e katalaneg, ar pezh a ziskouez ez eo kizidig an dud d'hor yezh. Kavout a rit a-gevret al lizher gourc'hemennin hon eus kaset.

Gourc'hemennoù deoc'h evit ho anaoudegezh e katalaneg. Plijus eo bepred gwelet tud dedennet gant ar yezhoù nebeutañ implijet.

Trugarez ha degemerit Aotrou va gwellañ soñjoù.

Miquel Strubell i Trueta

B ez eus ur «C'huizl Ke-murzhierzh Breizh» («Comité National de Coordination Bretonne»), a oa bodet d'ar Sul 5 a viz Du e Banaleg, o kemenn emañ o vont da ozañ ur Gouel Broadel Breizh hag Europa d'an 3 ha 4 a viz Mezheven 1990. «Evit ma vo ar Gouel-se ur c'hammed war-raok en hor seour evit deubriñ breizh» e c'houlenn ar c'huizl-se digant an holl aozadurioù «Kemer perzh er vanifestadeg». Titouroù digant O.Le Strat - Sant Fiaek-56520 GWIDEL - Pellg 97.65.98.74

ESTREN

DIWAR UR WIR VRO ZEMOKRATEL

ROBERT BAXTER

N'eo ket hepken e broioù bihan Europa eo ez kudennoù a frankiz hag a zemokratelezh. Traoù fall-put a zo o c'hoarvezout e kalon an demokratelezh (evel e larjod gwechall-gozh), d.l.e. e Breizh-Veur.

N'eo ket anavezet mat en diavaez Breizh-Veur an doare ma vez renet ar vros, ha mat e vefe, d'am soñj, e zisplegañ un tammig.

Kendalc'het 've da ren en doare-se gant ar c'hetañ-minisir, Marchant Tas-de-Chair, gwelenn ma bro din-me, moarvat.

Hogen hag a-du gant emañ al lodenn vrasañ eus ar voterien, pe n'int ket ? eme an arvesterien, penaos he dije gounezet teir gwech ar votadegoù, a-hend-all ?

Da gentañ holl, e vez komprenet an doare-votin ; er broioù tramor bez e c'hallas

«Tá Siar» («War-An-Tu-Gin-Emañ», i.w.) gounit ar mouezhadegoù gant 42% eus ar mouezhoù nemetken, ar pezh n'eo ket an niver brasañ avat, rak 48% o deus votet a-enep dezhi, evel ma c'hellit gwelout.

Gwashoc'ho e c'hoazh ma sellit ouzh Breizh-Veur bro-ha-bro ; e Bro-Skos hag e Kembre da skouer ne c'hounas nemet 42%.


N'eo ket demokratek kement-se, na petral Bez ez eo posubl rak an hevelep gouarnamant a zo evit beg bro e Breizh-veur, hag evel-se e vez dibabet renerien ar broioù bihan gant voterien binvidik mervent Bro-saoz ! Souezhus eo, pe get ?

Ur skouer all diwar digevatalder doare-votin Breizh-Veur : daoust ha sellet hoc'h eus ouz votadeg ar parlamant europeat ar bloaz-mañ ? Ha taolet hoc'h eus evezh en deus strollad ar re chias gounezet

15% eus ar mouezhoù ? Daoust da se, an abeg d'ar mod-mouezhoù implijet e Breizh-Veur ne zeuas ket ar re-mañ a-benn da liskaat ur c'hannet er parlamant (ar pezh a zo kontrol d'ar mod a vez implijet e broioù all hon Europa «unanet»).

Ha ne cheñcho biken an digevatalder-mañ rak en abeg dezhi a c'hell ken ar vourien diouz un tu ken strollad al labour diouz un tu all, mirout o gellout. Hag arabat deoc'h e vefe kement an di gevalader-se e broioù Breizh-Veur, kennebeut : a-drugarez da liv o bannieloù hepken ez int disheñvel an eil diouz eben !

Hogen dezo gwashañ ar vourien a vo lakaat en e blas e-doug diwez ar bloaz-mañ. Ar «Poll-Tax» (Tailh Votin) a vez anvet gant an dud dre-vas, Community Charge eo e wir anv hervez e groumen. Petra da lav, 'ta ?



AOSTRALIA : SPORTOU HA BANNELOU

A-berzh hon dileuriad Ispisial-meurbet e Melbourne, Aostralia.

C'mon, bet eo bet a-viskoazh ha bet eo c'hoazh OZ(*) prest alav a-benn emgav meur o sport broadel evit The Grand Final.

Ar Cats a zo bet trec'h war an Hawks en un doare dreist, gant 21-28 enep 21-12.

Gouel 'zo e Geelong, gant ar 16 milion bennak a skinwelerien hep disoñjal ar 100 000 den chafus a oa deuet a-benn da gaout un tiked da vont e-barzh ar Melbourne Cricket Ground (e lec'h ma tiele bezañ dalc'het lid-digerin ar c'hoarioù olimpek a vo maorvat e Melbourne e 1996).

Degas a reomp da soñj d'hol lenne-rien sot-pilic'h gant ar sport ez eo talvoudou-sock'h c'hoazh «The Australian Rules» eget

ar football gouezelat e-keñver sport fizikel hag arvestel, er bed a-bezh.

An deiz a-raok, e Skol-Veur Melbourne, e oa dalc'het pred-klozañ an 13vet Kendalc'h Etrevroadel a Vannielouriezh : ur c'hendalc'h a vignoniezh e lec'h ma oa bodet gwellañ arbennigourien ar bed evit eskemm o menozioù hag o skiant-prenet. War roll al labour e oa, e-touez traoù all, Ballarat, e vengleuzioù aour ha Barmiel Eureka Stockade. Un droidadig war lec'hioù istorel ar Murray River evit peurechuiñ an albom et'vorennoù dreist. Emgann 'zo bet lakaet evit kendalc'h a zeu e Barcelona e Katalonia.

Trugrez vras da Qantas Airways evit o c'henlabour.

Alan Rautet

(*) : An Aostralianiz
(**) : Kenavo!



35000 Roazon - Da gaout titouroù skrivit da OSCAR X2000 Pôle Central - 6 bali ar re Unanet - 35043 Roazon Cedex - pell : 99-35.11.11.

DERC'HEL GANT AN TABUT ?

Ya vat. Kudenn pennañ an Emsav eo an unvaniezh. Ur vro eo Breizh mard eo meizet evel un dra unvan. Ur pal politikel hon eus : emrenerzh hon bro. Ur pal pleustrek hon eus : an unvaniezh. Kement labour sevenet a-unan, ha dreist e ve, a zo disle- roch e dalvoudegezh eget hini ul labour sevenet a-stroll. Ne stourmomp ket eidiomp. E vit ur gevredigezh e stourmomp. A-gevret e ranker stourm ...

En ur gevredigezh ez eus tailhoù war an argant. Tailhoù war ar brud a zo ivez. Abaimour da se e chom dianav, alies, ar re o deus graet ar muiañ evit ar yezh, evit ar vro.

Penaos tizhout an unvaniezh ?

Ur goulnenn all a zo da ober a-raok : petra eo an unvaniezh ? Houmañ, tri-ugent vloaz zo, a oa an hevelebekadur. Ar « Gwir da vezañ disheñvel » eo a zo ouz hor ren bremañ. Ar c'hreiz, dech e oa, ar perzhioù fetis heñvel evit an holl. Ar c'hreiz, hiziv, eo al lezenn, ar reolen, a lak pep unan da ziorren hevel e vod.

Loeiz Herriou a skrive : « D'ho tro, tud gouie, da gempenn el labour evid na vo ket ur rann-yeñ e souro ur ré-all hag o mougo, med evid ma vo kemereñ ged peb unan aneñeñ er peñ hé-deus gwellañ, er peñ hé-deus kaerñañ d'ober er brezhoneg lénnegel e zelé boud yéñ broadel Breizh ».

Ar yezh a zo heñvel ouz an den. Evit dont da vezañ ezel eus ar gevredigezh e lie hemañ diorren, buhezekaet, e berzhioù gwellañ. Petra eo perzhioù gwellañ ur yezh ? He nerzh-bevañ : an nerzh-se en doa lakaet Gwenedourien da sevel ur yezh lennegel. Bez emañ ivez an anaoudegezh o deus an dud anezhi : m'o deus Gwenedou- rien 'zo poan gant ar C'h.L.T., ez eo dre ma z int dizesk war o yezh : « An holl vrezhonege- ren desket, eme Mariadeg Herriou, en em gompren evat kenetrezo ».

Ken dizesk all eo ar C'h.L.T.-gerien o deus poan gant brezhoneg Gwened ?

Anat eo. Anavezout ar brezhoneg a zo anavezout ar brezhoneg. Brezhoneg eo a vez komzet e Bro-Wened.

Petra eo kudenn ar gwenedeg neuze ?

Kudenn ar brezhoneg e bro-Wened ? Travalc'h eo sellout ouz ar gartenn. Deziñ da vezañ er brezhonegva ez a en-dro bro-Wened e-ziv ur vro a Vreizh Uhel, 1 skol Diwan zo en Orant, evel ma z'eus 1 skol e Naoned, e Roazhon pe e Sant-Brieg. Sant- Brieg, gant ouzhpenn 50 buge l a zo ur skol

was, hag un astenneus Breizh-Izel. Skol an Orant a hañval bezañ un astenn eus ar C'h.L.T.-va...

D'an deskadurezh vrezhonek bezañ ingalet reizh e tiefe bezañ peder pe bemp skol Diwan e bro-Wened, hag unan e- giz Sant-Brieg kostez ar c'hallegerien, e Redon, Gwerann pe Sant-Nazer.

Ha tagañ an dud eo embann ken- ment-se ?

Lod a lavar ez eo gouennelouriezh ?

Em lizher war Ar Men em boa graet ur fazi. Lakaet em boa ar gwall war gont ar Gwenediz. Lakaat ar gwall war gont an dud, war oc'hont personel, mar kavet gweli, a zo, gwir eo, un emzalc'h mirelour pe gilstour- mer. Ar c'houennelouriezh a zo ur bazenn ouzhpenn, ur c'hammed izeloc'h : lakaat ar gwall war gont korf, o gwad an dud.

n'heller ket lavarout e oa gouenne- louriezh em c'homzoù, nemet evit pouezañ war va fazi (gwelad Jules Gros, trede le- vrenn, p.50)...

Merzet em boa en ul lenn Ar Men e oa aet va fienn a-dreuz. Pezh en deus lakaet da lemmeñ va soñj. Setu enta disoc'h va rambreoù :

-Kudenn bro-wened ha kudenn bro- Naoned a zo heñvel dre o natur. Diskoulmañ an eil a zo diskoulmañ eben.

-Mag en deus bel hor yezh un don- kadenn dezhi hec'h-unan e bro-Wened ez eo en abeg da venozhioù, da zoa- reoù-ober, a oa re an holl ur mare zo bet. Piv zo da damall ? An unvanourien n'o deus ket ijinet ur framm gweñ awalc'h evit unvaniñ an holl ? Ar wenedourien o deus dalc'het gant o hent dezho dre ma na oa ket ar yezh unvan diouzho o doare

? Gouest e voent da sevel ur yezh lennegel, perak ne voent ket gouest da sevel ar yezh unvan ?

Petra ober neuze ?

Ar pal eo an unvaniezh ? Ret ober evit ma vije anezhi. Dibab hon troioù-lavar er c'heñver-se. Lavarout : « An tol-mouezh brezhonek a zo pe war ar silabenn diwez- hañ pe war ar silabenn eil diwezhañ » ken- toc'h eget « Ar pouez-mouezh brezhonek a zo war ar silabenn eil diwezhañ (nemet e gwenedeg e-lec'h m'emañwar ar silabenn diwezhañ evel e galleg) ». Peseurt foutre a reomp eus taol-mouezh ar galleg ? Daoust ma ne c'hell ar c'hallegerien lec'hiañ o zaol-mouezh e-lec'h ma plij dezho hep plan- tañ reuz e keinnadurezh hor yezh ?


Bez e c'hellomp gouzavur ivez e vije bet, kant vloaz zo, div skol lennegel, an eil e bro-Wened hag eben e bro-Leon. Hag ezhomm hon eus da zisplegañ istor brezho- neg Leon o tont da vezañ ar yezh unvan war an hevelep ton hag istor Bro-Barz o tont da vezañ bro-C'hall ?

Bez e c'hellomp ivez tigeñ peder pe bemp skol Diwan e bro-Wened. Ne vo ket diaesoc'h kavout danvez mistri-skol e-mesk ar Wenedourien (kement ha kaozeal giz ar vro d'ar re vihan) ha lakaat renerezh Diwan da gompren ez eo bro-Wened e Breizh-Izel petra bennak m'emañ pell eus Treginou.

Diouz tu an ober e vez atav an diskoulmoù. En abeg da se eo ivez e kavan- me dereat derc'hel war Vremañ gant un dael bouc'het war Ar Men. 300 den a ra gant ar brezhoneg a dalvez 30.000 a gomz eus Breizh.

Treñf a ra ar bed, war-raok ez a ar media. Un oberour, avat, a dalv atav kant lavarour.

Paskal Ar March'eg



1936 : ESPANHA EN FLORES

Marv eo Pasionaria d'ar Sul 12 a viz Du da noz, diwar un darijenn-skveant, en ospital e Madrid, 93 bloaz e oa. Adalek al Lun 13 e vo lakaet he c'horf e sez ar strollad Komunour Spagnol (PCE) ; a bep tu d'ar c'horf e oa banniel Bro Spagn ha banniel ar strollad gant bep a seizenn du. Deuet eo izili ar strollad, diennidiar beda-bezh, he c'hens- tourmerien a wechall da welout anezhi evit ar wech diwezhañ. D'nyao e vo kaset gant un ambrogadeg, en e benn sekretour meur ar PCE Julio Anguila, ar barz Rafael Alberti, meur a vistr ha diennidiar broioù all, betek bered sivil Almenuda.



gant ur menleuzier eus an Asturias, Julian Ruiz. Mont a reas asamblez gantañ er Strollad Sokialour. Ar c'hañs he doa bet da vont er skol kentañ derez, setu e ra war-dro sevel traktoù ha pennadoù evit ar glasoenn lec'hel « Menleuzier Biskaya », sinet gant ar vr b'Pasarian a zeus da vezañ ken brudet.

Al lod muiañ eus ar strolladoù poli- tikel, an holl sindikadoù, ur benn strolladoù ha kuzulioù-kêr hag an holl gannadiez eus broioù sokialour e Bro Spagn o deus kaset o gourc'hemennou a gengarfañ d'ar PCE. D'ar memes mare e lavare Gerardo Igle- sias, ex-sekretour meur ar PCE, e oa Pasio- maria « unan istoriel evit gwir, unan eus ar re bouezusañ koulz e istor Bro Spagn hag en emsavmicherour etrevoadel ». E menleuz- san Victor en Asturias e vo graet un harz labour a garfe voun he stourm evit gwellaat doareoù labourat ar vengleuzerien.

D'al lun eta e oa keloù marv Dolores Ibarruri war bajenn gantañ kazetennoù brasañ ar bed, en o zouez New York Times, Washington Post ha Walk Street Journal. Jia- varout a reas an Times : « he « no pasaran » a zeus da vezañ ger-stur ar republik », ha degas a reas da soñj e teuas ar frazenn a adlavare-hi alies : « Gwelloc'h mervel war- sav eget bevañ war an daoulin », da vezañ ger-stur ar stourmerien evit ar frankiz er bed a-bezh. E memes mont e'c'h embanne an Times e Londrez, ha kalzig a gasetennou e Bro Italia (Corriere della Serra, Stampa Sera, L'Unita), he marv. Prezidantez Kamb Dilennidi Bro Italia, Nilda Iotti, a lavaras e vo Dolores Ibarruri « unan eus ar re vrasañ, ar re arouezusañ ha kare ar muiañ en emsav micherour hag er stourm enep-fas- kour ». Padal, setu ar pezh a voe gwel- let dilenn ar Ouest-France, e traoñ ar bajenn « Estren », ha gant pebezh titl :

□ Exit la Pasionaria. — Parti communiste espagnol (P.C.E.) et l'une des figures les plus connues de la guerre civile, est morte dimanche après-midi à Madrid. Elle avait 93 ans.

D'ar meurzh he deus klasket O.F. adaptout an taol war a seblant, gant ur pennadig diwar-benn buhez ar Basonian.

Ganet e voe Dolores Ibarruri d'an 9 a viz Kerzu 1895, e Gallarta, ur gêriadenn a Viskaya e lec'h ma veze an dud diwar ar vengleuz, 13 buge l a oa en tiegezh. Goptoù izel, dienez, stourmoù sokial, gwaskerezh. « Merch, gwreg ha c'hoar menleuzerien on, ha gant an istorioù-se ont deuet da vezañ komunour evel-just », a lavaras-hi. C'hoant he doa da vont da skolaerez, met matezh e voe betek he eured, da 20 vloaz,

voe anvet da brezidantez ar PCE. Ma voe « Stalinoù », evel ma z'eo bet lavaret, e oa peogwir e soñje, evel ur rumad a-bezh, he c'helle nemet an URSS enebañ ouz an hi- lenouriezh, 'ha mervel a reas he mab Ruben e Staligrad e 1942. Sevel a reas Pasiona- ria a enep aloubadeg Tchekoslovakia, ha soulen a reas start. Hag hi o chom atav e Moskov-an eurokomunouriezh, a enep da Vretchev ; lakaat a reas diaes a-wechtoù renerien an URSS, met kare e oa kais gant tud ar vro.

Pa oa adtreñt en-dro ar PCE e 1977 e listroas da vro Spagn e miz Mae : degem- eret e voe gant un engroez entañet en Asturias hag e Bilbao ; nebeut war-lerc'h e voe dilennet, evit an eil gwech, da 81 bloaz, deputez evit an Asturias. Pa zeus an itron gzh gwisket du-se e-barz ar Prezidiat ar Cortès : « Degemer mat er gêr, Treñt ».

Mervel a reas hep gellout lidañ mont war-raok Izquierda Unida (IU), an emglev kaset war-raok gant ar PCE, d'an dilennad- degoù diwezhañ. En ospital e oa d'ya. Met pa vo lavaret dezhi e oa bet gounezet kaz- mant ur milion a vouezioù a-kevher 1986 e lavaras hepen « què bien ». Dont a reas he holl vignoned da welout anezhi ; en he c'hichen e chomas he mignonez kozh Irene Falcón, he merc'h Amaya Ruiz, hag ivez he merc'h vihan Lolita, bel gant e WOCKBA (Moskov). Disul ez eas kuit Amaya e-pad ur pennad da zigeñ ur greizenn a skoazell sokial e Arganda, anvet Kreizenn Dolores Ibarruri. Nebeut goude he distro e varvas he mamm. « O vevnel eo deuit da vezañ divarvel. An efwor gwellañ eo kerd- d'erc'hel ar stourm a grogas-hi gantañ 70 bloaz » zo, a lavaras-hi. Pasonian a lav- aras ivez nebeut a-raok he marv da Santiago Camilo, deut da welout anezhi en ospital : « santiago, ret eo derc'hel da stourm ».

Evit diskouez ar c'holl en deus graet en deus divizat ar PCE e chomo goull ar plas a brezidantez ha ne vo mui anvet den ebel d'ar c'hang-se en amzer da zont.

Kafr bras a zo gant ar Republikan- ned hag an emsav micherour er bed a-bezh, kafr ha kour.

« Espanha en flors de mar en mar. Dins ieu coma un soliel repolla l'estu dau Frente Popular. » (2)

Anshel Babel

(1) Tud krouz, deut 'maez ar skeud a lavaras d'an droug : ne dremeniet ket.

(2) Spagn e bleuvf a vor da vor ennon evel un heol e sav en-dro harf ar Dabenn Bobek.

Max Allier, Solstici, La Crda III.

DESKADUREZH

CAPES

KORSIKA 7 / BREIZH 1

Gouzout a reer bremañ e vo kont gant daou gCapes ar rummad K (yezhoù «rannvroel») a ginning Ministr ar Deskadurezh C'hall d'ar Vretoned ha d'ar Gorsed hervez «Kazetenn ofisiel ar Republik c'hall» (10 a viz Gwengolo 89).

Dishfevelerioù

Ma z'eus perzhioù hefevel gant an daou stumm CAPES-se (un eil danvez zo stag outo o-daou) eo anat an dihefevelerioù bras a zo etrezo, ha n'eo ket e-barzh ar 4 eur da sevel ar studiadenn-hennegezh vrezhonek, pa z'eus 6 da sevel an hini gorsek, ennañ hepken !

Nann, gant an eil danvez ret, ouzhpenn ar brezhoneg hag ar c'horseg eo emañ an dalch !

Eil danvez.

El lodenn dre skrid eta ez eus un eil danvez, pa c'houlenn ar Vretoned hag ar

Gorsed e vefe lammet kuit. An eil danvez-se a rank bezañ dibabet etre 4 : ma z'eo boutin ar galleg hag ar saozneg, ne vez ket kinniget d'ar Gorsed dibab ar jedoniezh pe an istor-douaroniezh, ha d'ar Vretoned ar spagnoleg pe an italianeg. Ken e deus skrivet Gwenael Emelyanoff, ur brezhoneger bet studiet gantañ ar spagnoleg, da glemm d'ar ministr peogwir n'hall ket kenstrivañ evat er stumm m'emañ an traoù.

Niver ar postoù.

Da c'hortoz disoc'h niveridigezh-poblañs ar republik C'hall a vo da volkollit a 1990, sasnet, e konter tostik da 4 milion e Breizh dispazh hag hogos 300.000 en 2 zepartamant a zo bet savet e Korsika.

Diwar an 8 stael nevez a vo krouet gant Ministrerezh Gall an Deskadurezh e rummad K ar c'hcapes yezhoù «rannvroel» ne vo nemet unan evit ar brezhoneg, pa vo 7 evit ar c'horseg. Ha 7 gwech brasoc'h eget Breizh e ve Korsika evit ar Ministr.

Alan Penneq

Un dismegasif ruz.

Klevout a ran lod ac'hanoc'h o tisplegañ an digempouez-se gant niver ar bombez o larzhañ du-hont, pa chom ken sioul an traoù dre amañ. Ne gredan ket tre, rak da neuze n'eo ket 7 stael, met 50, pe muioch, a oa da grouñ e Korsika!

Bezet a vezo, anat eo n'eo ket gant ar «justis» eo awenet renerien ar stad en hor c'h'river : diskouez hon nerzh eo a ranker ober ma fell dmp gwellaat hon stad. Hasañ buan d'ober manifestadegoù evel e Naoned a zo d'ober. Ha muioch c'hoazh.

* Pa soñjere eo emsaverien o c'hortoz tud Korsika da lakaat ar c'hcapes brezhoneg da wellaat!

Lennet em-eus ur pennad gant Jean Cevaër e «L'Avenir de la Bretagne» : «*La Vérité et les Mensonges* [sic]; *L'année des assassins d'enfants*» (skrijus...)

Marteza n'em eus ket komprenet pep tra, da gentañ e lavar ez eo bet disoñjet «bloavezh ar vugale» abalamour da ouellioù ar Bioentennere, hag ez eus bet lazhet ur bern bugale da vare an Dispac'h O.K. Hag a-greiz-peg-tout : «*Faut-il s'étonner que le parti marxiste-léniniste (roudezh mar-plij), dont les historiens monopolisent l'étude de la période révolutionnaire* [e peseur strollad politikel emañ Roger Dupuy, au fait ? ha Mona Ozouf ?] *soit si agressivement en faveur de la commémoration de la Terreur* [o a-benn 4 bloaz e vo 1993], *en effet ? ce fut Lénine qui le 16 juillet 1918 ordonna l'assassinat des 5 enfants du tsar à Ekaterinenbourg*» [n'am eus ket heuliet mat an diellennadurezh...]

War-lerc'h ez eus kaoz eus ar Gimered Ruz hag eus ul lizher-respond a oa bet kaset gant Jean Cevaër d'an Express e 1975 diwar-benn un interview eus «*ar c'ho-munist Ferrat*» hag a lavare n'ouzomp ket mu peitra, met war ar seblant ne oa ket J. Cevaër a-du gantañ alav.

Pelloch e kaver meulodi da «*un très grand Français, le docteur Bernard Kouchner*», hag en deus diskleriet ne oa ket da zougañ ouz bevernoù ar Stadoù hag ouz ar galloudoù pa vez lakaet tud da c'houzafn ha da werel, ar skrid-se da ve-

EKATERINENBURG MON AMOUR



zañ kavet e-barzh un diskleriadur hollvedel diwar-benn ar Gwirioù-Kenskoazellañ etre an Dud. «*Vollà bien un texte fondateur et auquel nous devons souscrire et qui sera l'honneur de la France de ce siècle* [?]. *Car les hommes et les femmes qui nous le proposent, ces «French Doctors» qui font l'admiration du monde entier, ont souvent payé de leur liberté, parfois de leur vie, mais touj urs de leur*

héroïsme et de leurs souffrances le droit de le proclamer. Ce qui sera la gloire de la France [? ?] ce ne sont pas des campagnes militaires douteuses, ou les monuments babyloñiens érigés par des monarchies républicaines mégalomanes, mais bien ces organisations qui ont pour nom Médecins du Monde, Médecins sans Frontières, Aide Médicale Internationale, Handicap International...» ha ne vefe ket ar seurt skozellioù-se un doare trevadennouriezh mod nevezh ? Heñ ?

«*Le Mouvement Breton, en butte aux persécutions jacobines [!] depuis des décennies, a toujours [!] défendu ces idéaux et a toujours proclamé que tous les peuples étaient solidaires, quelle que soit la couleur idéologique de ceux qui les tyrannisaient*» [euñ bouzaet omp alle-soc'h gant tagadennoù ouz brioù sokialour eget ouz ar Chile, Afrika ar C'hrestitiz ...] «*nous venons bientôt triompher les véritables droits de l'homme et les Français peuvent être fiers [????], et, pour une fois, à juste titre, c'est un ministre du gouvernement Rocard qui en fut le héros, il y aura bientôt un quart de siècle.*»

Marteza n'on ket troet mat gant an dud ne komprenan ket o menozioù don. Met petra 'reoc'h, «*la pité n'est pas un sentiment révolutionnaire.*»

Anshel Babel



KELENN BREZHONEG ER 5 DEPARTAMANT

Lañs stourm an deug

miz) da stummañ skolaerien, da da c'hortoz disoc'hoù an DEUG a-benn 4/5 vloaz (ul Lisafs a ranko ar skolaerien kaout er bloavezhioù o tont.)

1) **Merezidig digempenn** ar c'hellenn brezhonek er skolaioù (darvez dieub pe L'VII). Kelenner ebet e-miz Gwengolo e Karaez, Ploared, Perroz, Pontrev, Gwengamp... Ar renerien-skolaioù eo bet ret dezho kavout kelennerien (en ur implijout evezherien da skouer) pe d'hon Unvaniezh a zo aet da gask tud e diavaez an deskadurezh (Lizig Huon e Pontrev ha Perroz).

2) **Digorsk war an eurvezhoù brezhoneg**, en abeg d'an diouer a vugale dedennet gantañ. Goude bezañ bet embannet ne vefe kelenner ebet, pe chomet hep embann e c'hellenn dibab ar brezhoneg (lise Lesage e Gwened).

3) **Diouer a bostoù ar c'hapes brezhonek**, e-keñver an ezhornioù (post e 88, 1 e 89, hag 1 c'hoazh e 1990).

4) **Youll fall ar stad** a nach anavezout barreghez pedagogel ar skolaioù Diwan (a gendalc'h abaoe 12 vloaz da gemer plas ur servij publik dilezet ganti) dre sinadur kavadoù nevez.

5) **Nac'hadenn bennek rektorezhiz Naoned** da gas war-raok ar c'hellenn brezhonek el Liger Atlantel, (Manifestadeg d'an 18 a viz du hag emgav gant ar Rektor d'an 29/11).

Setu eta palioù kentañ UGB er bloaz-mañ :

1) **Kas war-raok stummañ digaboez ar vistr-skol**, war ar brezhoneg, dre stajou hir (3 miz). E pep departamant evit ar skolaerien, en akademiezh evit ar gelennerien (an emglev a oa bet e-miz gouere dwezhnañ gant ar Rektor a zo chomet bout abaoe...)

2) **Kreskiñ an niver a bostoù ar c'hapes brezhonek**.

3) **Kas war-raok an digoradur da sevel digaboez Breizh e pep skol**, (D'an istor, d'an Arzoù, ha d'ar Yezh).

4) **«en ur grouñ un «UF»** dre ret evit kement danvez-skolaer er 5 departamant.

5) **«en ur grouñ un eurvezh dre ret er skolaioù ha liseoù, evit an holl**

«en ur grouñ ur post mestr-animatour war ar yezh hag ar sevenadur e pep sifkonskripsion-enselleriezh (IDEN) a Vreizh-tel, hep limal eurvezhoù diwar ar postoù kuzulierien a vo o fal sevel stajou hir, da skouer en Aodoù an Hanternoz : 3 fost evit Gwengamp I, Gwengamp II, ha Lannuon.

6) **Lakaat ar Rektorezhiz da verañ en un doare digempenn** ar c'hellenn brezhonek er skolaioù ha liseoù (darvez dieub-LV ha LV III).

7) **Dre gelaouiñ dre ret ar skolidi hag o zud diwar an dibaboù a c'hellont ober**, hep gortoz ma vefe anvet ur c'helenner.

8) **Dre sevel «kartenn ar skolioù»** e-miz mezheven evit ar bloavezh-skol o tont.

9) **Dre fiverañ an holl gelennerien a vije dedennet gant postoù kelenne brezhoneg**, e Akademiezh Roazhon kement hag en diavaez, a-benn reiñ d'ar re o deus diplomad brezhonek tu da zont buan d'ar vro en dro.

10) **Dre enskrivadur an eurvezhoù brezhonek e implij-amzer boutin ar skolaioù.**

11) **Dre sevel strolladoù skolidi unvan e-keñver live brezhoneg.**

12) **Reiñ da dalvezout an holl reolennoù-mañ d'al Liger Atlantel a zo anezhi un darn eus Breizh.**

Evit ha gant asant burev UGB : J.Do Robin

AN DUCHENN HUD
BECHEREL

KAFEDI-TI KRAMPOUEZH
abadennoù-noz
A-BEP SEURT

Etre ROAZHON ha DINAN (ul lec'h plijus digemer e brezhoneg, 25 min eus Roazhon !!!)

bremañ 15

kuzulioù-ker

ouzhpenn 400 a vennadour

a-du gant ul LEZENN-STUR evit ar «Yezhoù ha Kulturioù-Rannvro»

Abaoe bloaz bremañ eo krog an Emglev evit Lezenn ar Yezhoù da bediñ Maered Breizh Izel evit kinnig d'o C'huzulioù Tiez-Kêr mont a-du gant ur Mennad o c'houlenn ma vefe savet ur «statud» pe Lezenn-stur diwar-benn gwirioù ar brezhoneg, kultur Breizh, yezhoù ha kulturioù Rannvroioù Bro-C'hall.

Setu aze un dra hag emañ a-du gantañ ar pep muiañ eus ar Vretoned, n'eus forzh eus peseurt kostezenn pe gredenn e veleit. Ha sirvoud e-leizh a zo bet graet betek-hen hag a zalc'her da gas en-dro evit ma vefe, a-benn ar fin, diskliet gant ar stad hor gwirioù sevenadurel hag evit ma veleit lakaet da vat da d'out Stourmoù nevez a ranker bep bloaz kas war-raok o klask kaout al lezenn dre-vras bet goulet dija ken ailes hag a vefe embannet enni ar plas deiet reiñ d'ar «yezhoù rannvro» war tachenn an Deskadurezh, ar Media, ar Melestradurezh, an Endro.

Warlene, da heul ar goulnenn-berzh an «Emglev evit Lezenn ar Yezhoù», e oa bet goulet adarre ar seurt lezenn-se tro-ha-tro gant Kuzulioù Penn-ar-Bed, Aodoù an Hanternoz, ar Morbihan, ar C.E.S. ha Kuzul-Breizh dindan stumm ur skrid-mennad diskliet mat-tre ennañ abegoù ar goulnenn nevez.

Kinnig a reas neuze an Emglev evit Lezenn ar Yezhoù ouzh un toullad Maered goulnenn digant o C'huzulioù mont a-du gant skrid an departamantoù ha Kuzul-Breizh. Digemeret brav-tre e voe goulnenn an Emglev peogwir e voe dasstumet evel-se un daou-ugent bennag a Vennadoù kuzulioù Tiez-Kêr. Divizet e voe neuze kas ar memes goulnenn da holl Vaered Breizh-Izel, gant ur skridbarroch o c'houlenn nevez al Lezenn-stur hag o c'harpañ hor c'huzulioù-Meur a Vreizh.

Goude ur bloavezhad labour start ha dibaouez kaset en-dro hep ober brud, e c'hell bremañ hon Emglev evit Lezenn ar Yezhoù reiñ da c'houzout pelec'h emañ erru en e gest Mennadoù Tiez-Kêr :

-Betek bremañ, betek devezhoù kentañ miz Du, 411 a Guzulioù-kumun o-deus roet keloù e oa bet votet ganto ur Mennad o c'harpañ Asambloù Departamantoù ha Kuzul-Breizh o c'houlenn ul Lezenn-stur evit ar «Yezhoù ha Kulturioù-Rannvro», evel ma reer diouot. Bez' ez eus avat meur a Vennad, bet votet, ha n'int ket bet kaset deomp evit ar mare : bep miz ez erru ganeomp digemer meur a hini ... bet mouezhiet ni pe c'hwec'h miz kentoc'h !

-War ar 411 Mennad anavezet ganeomp, 349 a deu digant kumunioù a Vreizh-Izel, da lavaret eo digant 60% eus ar 580 kumun a gonter eno.

-A-douez an 349 Mennad-se, 202 a deu eus departamant Penn-ar-Bed, da lavaret eo int bet mouezhiet gant 71% eus ar Guzulioù Tiez-Kêr (238 anezho).

-Evit lodenn vrezhoneg departamant Aodoù-an-Hanternoz (pe... Aodoù-an-Arvor, an anv nevez a vo da implij hep dale), 60% eus he 167 kumun o-deus, betek-hen, roet o asant. E lodenn «vrezhonek» ar Morbihan, hag a zo bet kaset eno lizher-goulnenn an «Emglev» diwezhatoc'h eget en daou zepartamant all, n'eo ket lizhet evit c'hoazh an hanter eus niverenn ar c'humun a zo enni (130), nemet gant ar promesoù bet roet deomp e vo lizhet ar 55% hep re a zale.

-Dileet eo menegiñ eo bet mouezhiet ivez 2 skrid an «Emglev evit Lezenn ar Yezhoù» gant 62 kumun eus Breizh-Uhel, youl ganto harpañ Tiez-Kêr Breizh-Izel. Ha darn anezho o deus lavaret war un dro e lie bezañ difennet nevez ar sevenadur «gall»-unan eus stummoù sevenadur Breizh. Ret eo, a-hend-all, reiñ da c'houst n'eo ket pusbi betek bremañ d'an Emglev kas e lizhiri hag e zarvez-mennad (meneg ennañ eus ar zevenadur gallo) nemet d'un darn vihan-tre eus Maered Breizh-Uhel. Ar pezh a c'hello bezañ graet er mizioù a zeu.

-Ar sirfrou roet amañ uhelloc'h a vo kresket un liamm mat a-raok ma vo echu strivadenn pe «kampagn» an «Emglev evit Lezenn ar Yezhoù». Gortozomp dibenn ar bloaz, hag e vo gweliet !

Gant ar sirfrou-se, avat e weler bravik a-walc'h pebezh «eostad» mat a Vennadoù a zo bet graet gant hon Emglev, o ligas da holl difennourien hor Yezh an testeni emañ ar pep muiañ eus dilennidi hor c'huzulioù a-du da vat evit ma vo, a-benn an diwezh, sevenet gwirioù sevenadurel ar Vretoned. Gant se eta digaset deomp un abeg muioc'h da goulf fiziañ en amzer-dazont, da lavaret eo da zerc'hel startoc'h evit biskoazh gant ar stourm!

Sekretourien an EMGLEV EVIT LEZENN AR YEZHOU 40bis rue de la République, 29200 BREST



DEIZIOU AN EMGLEV

En Oriant e miz Genver, eus an 19 d'an 21. D'ar Gwener 19 : "Cantique à Me-lilla" gant Xavier Grall, c'hoarriet gant STROLLAD AR VRO BAGAN ha d'ar Sadorn 20 sonadeg gant "Barzhaz" ha fest-noz. D'ar Sul 21 vo tu da glevet ha da welet : "KEYRENN AN ALRE".



ADKOUMANANTIT 150 lur ar bloaz DA V- bremañ

bremañ 16

KEMENNADENNOU

RADIO-BRO 88.E E BRO-BARIZ

Abadennoù divyezhek (brezhoneg ha galleg) bep gwener da noz etre 8e ha kreiznoz, bep sul veure etre 8e hag 11e.

Program miz kerzu 1989 d'ar gwener da noz :

- 8e Kinnigadur program an abar-daevezh ha Sonerezh.
- 8e30 Pennad-stur gant Serj.
- 8e35 Kleier (brezhoneg ha galleg) displeget gant Mai ha Serj.
- 9e Mesk-divesk (kleier sevenadurel, c'hoarioù).
- 9e45 E-pad ur c'harder ez eus tu da gas kemennadennoù da Jilbert kabon dre hanterouriezh Radio-Bro.
- 10e «Breizh hiziv», magazin : d'an 1/12 : Gouel an Oriant gant Michel
- d'an 8/12 : mojenn an ankou : ur studiaden diwar-benn anatol ar Braz gant Doming
- d'an 15/12 : magazin ar brezhoneg gant Serj Richard
- d'an 22/12 : ekonomiezh gant Yann Fievet
- d'an 29 : danvez ar magazin a chom da gavout.

11e abaden sonerezh.

- d'an 1/12 kaset en-dro gant «Derrière de chez mon père».
- d'an 8/12, kaset en-dro gant Kelc'h keltiek Sartrouville.
- d'ar 15/12, eilvet lodenn «Maria ar Faouel» gant Gwendal ar Floch.
- d'an 22/12 : kaset en-dro gant ski-pailh Radio-Bro.
- d'ar 29/12 : kan ha diskan gant Maoris Poullmarc'h, Serj, Tien h.a.

RADIO-BRO 47.61.00.75 Boest-post 639 75367 Pariz Cedex 08

D'ar sul 10 a viz kerzu deus 9e30 da 11e deus ar beure e kinnigo deoc'h Tien Rouaud un abaden diwar-benn ar c'hanaouennoù war follennoù dislag.

Goude ar brazel-bed diwezhañ e veze kavet c'hoazh er foarioù hag er marc'hadou tud o werzhañ kanaouennoù war follennoù dislag. Savet e vezent e brezhoneg gant tud eus ar bobl peurliesañ, diwar-benn ar garantez, ez eus bet abeg er c'hanaouennoù-se gant gouizieñ veur vreizh dre ma oa re zic'hian o yezh ha re zister o zemoù da denn d'o sec'hed d'an henstummoù. Koulskoude ez eus deus ar c'hanaouennoù-se un testeni eus hengoun hag ijin -krouñ ar Vretoned.

D'an 10 a viz kerzu neuze ho po tro da ober anaoudegezh gant ar stumm-len-negel-se. Kaoz 'vo, e-pad an abaden, eus :

- Alexandre Ledan, bet moulet, skrivet ha dasstumet gantañ ar seurt kanaouennoù.
- Josef Ollivier, hag en deus studiet anezhe.
- Daniel Giraudon, bet skrivet gantañ ul levr diwar-benn an danvez-se, embannet gant Skol Vreizh.
- Gallout a reot ober goulennoù war-eeñ, e brezhoneg pe e galleg dre bellgomz d'ar 46.61.00.75.

D'ar sul 24 a viz Kerzu e vo kaset en-dro abadennoù an endevvezh gant Bretoned Radio-Bro :
- deus 4e da 5e30 goude kreisteiz e vo un abaden diwar-benn ar «Bogue d'or» gant Michel Praty.
- Ha deus 5e30 da 7e e vo kofc'hennoù Nedeleg gant gwendal ar Floch.

KENDALC'H KELTIEK ETREVROADEL SKOURR BREIZH

Digas a ran da soñj deoc'h e vo kendalc'h ar bloaz a zeu e Kembre.

Setu titouroù :

Skol Veur ABERTAWE (Swansea) : 30 a viz Gouere - 4 a viz Eost

Danvez : An Arzoù hag ar broioù keltiek.

Priz : 135 £ bod ha boued e-barzh sitè ar skol-veur.

Tu a zo feurmñ un tirannidi e keria-denn ar studieren (4,5,6,8,9 pe 11 den) : 4 den : 155 £, 11 den : 255 £.

Goulnnet e vez rakpeamant a 20 £ a-raok ar c'hentañ a viz Kerzu.

Tu a zo reserviñ pe kaout titouroù o skrivañ diouzhtu da : Hugh hag Eunwen PRICE, Y Gamm, Swansea Road, Lleweltha, Forestfach, ABERTAWE, CYMRU SA5 4NR (tel 0792-586711)

Loik Chapel sekretour skourr Breizh 5 straed Berioz 29210 PLOURIN MONTROULEZ

BREIZH BREMAÑ ! Kelc'h Breizhek Bro an Oriant

Pailoù :
* Live lec'hel : pailoù ar c'helc'h a zo lec'hel dreist-holl.

Bodañ an dud a fell dezho prerediñ ha labourat evit amzer-vremañ hag amzer da zont Bro an Oriant.

Difenn, skignañ ha luskañ ar yezh hag ar sevenadur breizhek e Bro an Oriant.
Labourat evit kas war-raok ar c'hudennoù armerzhel ha kevredigezhel e Bro an Oriant.
Labourat evit gwellaat stad ar vuhez, difenn an ekologiezh ha gwareziñ ar glad naturel.

* Live broadel : kemer perzh, evit Breizh a-bezh, en oberennoù aozet evit lakaat da davezoù ar yezh, ar sevenadur, an amezh ha madoù naturel ar vro.

Doare ober ar C'helc'h :
«Breizh Bremañ» a zo ur C'helc'h kevredel, o vodañ ar c'helc'hioù kumunel evit unaññ ha krefvaat o labour war dachenn Bro an Oriant.

«Breizh Bremañ» a fell dezhañ labourat er c'humunioù da heul : An Oriant, Lannestler, Lokmaria an Arvor, Gwidel, Plañvour, Kewenn, Rianteg, Enez Groe, Ystet, Kaodan, An Herbonit, Porzh Loeiz, Lokmikaelig, Kerivnag, Pleheneg.

Mho peus c'hoant kaout titouroù, skrivit da :

BREIZH BREMAÑ 33 straed ar Vammenn Gaer 56100 An Oriant

al liamm A

Koumanant bloaz 120 lur (studieren, soudarded ha tud dilabour : 100 lur)

Skrivañ da : AL LIAMM 16, straed des Fours à Chaux - 35400-St Malo

bremañ 17



Musique bretonne (Novembre 89 n°97)

Pennadoù a bep seurt diwar-benn sonerzh hengounel Breizh (unan all a zo ?) gant Robert Bouthillier, Michel Collet, Eric Marchand, hag all.

Pennadoù-kaoz gant Pierrick Lemon, arbedour brudet, Serge Moelo, deuet da vont kuzulier teknikel e «Renerezh Rannvroel ar yaouankizoù hag ar Sportoù», diwar-benn e levr nevez «Guide de la musique bretonne», hag all. Diwar ar 36 pajenn e vo dedennet ar vrezhonegerien gant an tri a ya gant o yezh dreist-holl, ma vo kavet emañ tamm kentañ un danevell (dic'hortosat-tre). «Ar biz-meud», gant Yann Boullvas, hag ur «Son ar chase» dastumet gant bernard Lasbleiz.

H.P.

YANN BREKILLEN E SANT-BRIEG

En Europa da zont, n'e hell ket Breizh bezañ hep Naoned.

Ur brezegenn a zo bet gant Yann Brekilien e Sant-Brieg ar c'hentañ a viz Kerzu e-kerz Devezhiou Al Lennegezh.

Araok mont war e leve e oa Yann Brekilien Prezidant Lez-Varn Gwened. Skrivet en deus un digoront levr bennak, en o zouez an hini anavezet mat *Buhez pemdez-iek paizanted Breizh en XIXvet kantved* e dastumad brudet Hachette «Buhezioù Pemdez-iek». Perzh bras en deus graet ivez e romant istorel *Ar vlezeg hag ar pemoc'h-gouez*. Emañ-eh o paouez embann ur skrid *Kannadeg ar Gelted diwar-benn diskar sevenadur Kormog Europa*, a ray, moarvat, un tamm troud.

Aozet eo bet ar brezegenn gant Oaled Abiherve, kreizenn kulturel breizheg.

«Lara» ul levr danevellou savet gant Goulchen Kervella (embannadurioù Al Liamm) a zo ul levr brezhonek a zo moaien da lenn hep en em ahmerdin. Souezhusat tra! Dedennus eo an danevelloù, swazh e lenn o danvez -ur wech ouzhpenn e Breizh- d'an alkilegezh hag an etimopsikiatreezh (met micher an oberour eo). Erfin : dre c'haf e vank ar «maltraez». An danevell «Lara» dreist-holl a zo fromus ha brav, ken e tenn da zanevelloù Edgar Poe. Keuz am eus koulskoude ec'h echelle al levr gant danevell

LENNOMP !

«Va zroiad er Gêrbenn», a denn da grouidigezh an aotreegezh vrezhoneg, hag a gavan ponner a-walc'h -arouezius plom-plom kwa! (Hini «lz 2000» ivez). Met talvoudus eo al levr da vezañ prenet, ha ne gavoc'h ket hir ho amzer ouz e lenn.

Emañ Bernard Tanguy ha Jean-Marie Ploneis, o daou klaskerien er CNRS, o paouez embann bep a levr diwar-benn al lec'havadurezh e Breizh hag en o c'hornbro (leoh ha Kerne Uhel). E vit ar skiantourien-se war ar sabbant, ne dalvez mann al lavaren «Gortoz pell, gortoz gwel».

Anshel babel

KELEIER AR VRO - miz Du 89 - n.7
 Haoust ma n'en deus ket graet berzh ar galv d'ar vrezhonegerien da skrivañ e pajennoù kanadig «EMOLEV BRO AN ORIENT», e ya war-raok obererezh ar c'hentrollad-se : panelloù div -yezhek zo bremañ e Keven, hag en Orient e vo kaoz eus divyezheg ar panelloù er c'huzul-ker e miz Kerzu. Goude goulennou an Englev ivez e vo gwelet ar Gwenn-ha-Du war meur a d-isker (Rianteg, Keven). Kemenn a reer ivez «DEIZIOU AN EMOLEV» a vo d'an 19.20.21 a viz Genver -Berz dezho !

VIVRE AU PAYS (Combat Socialiste) niv 974 - novembre 1989 -
 Ha dere'hel a ray kelaouenn PSU Breizh da vezañ embannet goude marv ar PSU ? Ya, war a sabbant. En niverenn-mañ e kaver div bajennad diwar-benn Bro-Buskadi «o tisteurel ar stourm armet» a-hervez. Kavout a reer ar gelaouenn-se er stalioù breizheg hag e Sant-Brieg (34 straed ar Goued BP 329 22006 ST BRIEG). Abaoe ur pennad ne gaver mui a bennad brezhonek e-barzh.

EMGANN niv. 49 miz Du 1989 -
 Pennadoù diwar-benn ar beskerzh, labour an ed-du, pompe-rien sant-Nazer, promesoù kozh ar PS e 1981 (kentelius-tre !), Gilbert Kabon, afer Per ar C'hamm. E Brezhoneg, ur pennad gant Lan Tangi diwar-benn Kurdistan, ur pennadig-kaoz gant Annaig Renault ha kemennadennoù

PEUPLE BRETON niv. 311 miz Du 89
 Pennadoù diwar-benn al labour-douar disaotrus, dañjer al listri-spluj, ar gwaskerezh e Turki, Bro Dibet. E Brezhoneg e skriv P.R. e soñj eo un doare mat da stourm evit ar yezh an duañ panelloù.

ENFANTS D'ABORD niv 136 -nov 89
 20 pajennad diwar-benn an darvoudoù etre ar vugale hag ar yezh. Pennadoù a bep seurt zo. Lenn a c'haller da skver : «Ar yezh eus o sud zo bet santet gant ar c'halloued a-raok dezho reiñ mez eus o sud d'an embroidi.» ... Da lenn gant an tadou, ar mammoù, hag ar vugale omp bet holl.

CAHIERS DE L'EDUCATION NATIONALE (Sept-Oct. 89 - niv 74 -)
 a venegimp amañ evit ar penna- doù diwar-benn keless «ar yezhoù bev er c'hentañ derez» ha dreist-holl ar pennad-kaoz gant an aotrou Nique, o paouez kuitaat e garg a enseller akademiezh en «Il-ha-Gwilin». E vit kompren pegen digor eo spered an dud uhel-se d'hon yezh n'eus netra gwel ; ger ebet diwar-benn ar brezhoneg a vez kelen- net abaoe tost da 10 vloaz e klasoù divyezhek ur skol-stad nepell diouzh an ensellerdi.

BRD WENED : aozet ez eus bet ur genstrivadeg tres- sañ diwar-benn 7 eus 85 gwerz «Barzhaz Breizh», gant Kelc'h Sevenadurel Gwened, evit skolidi kentañ derez ha skola- jout Bro-Wened. Gant Ensellerezh Akademiezh ar Mor-Bihan eo bet brudet ar genstrivadeg er skolioù.

NAONED KENTELIOU AN NOZ

Kentelioù brezhoneg
 Bloavezh-skol 1989-90 :

22 gentel etre miz Du 89 ha miz Mae 90, digor d'an holl.
 -Ur gentel un eurvezh ha kard bep sizhun, nemet e-pad ar vakansoù-skol.
 -Awelet e vez ar c'hentelioù war-lerc'h pep maread vakansoù.

Deraouidi («Bloavezh kentañ») : da 8 eur ha kard G.M. bep lun.

Live daou : da 8 eur nemet kard al lun ivez.

E Ti Keliek 3, straed Harrouys 44000 Naoned. Titouroù hag enskrivadur : 40.43.54.38. Minitel 3614 kod TELEM. Priz : 300 lur ar Bloavezh.

kentelioù noz

Stajou brezhonek berr

Ar sadorn, etre 2 ha 10 eur G.M. Chom a ra vak ar sadorn vintin hag ar sulvezh ivez, 12 Km. pell diouzh kreizker Naoned.

Evit ar blijadur da gomz brezhonek, da gajañ gant deskarded vrezhonek all ha gant brezhonegerien, hag ar blijadur d'en em gavout asamblez er veilhaedeg.

Ar c'hentelioù : etre 2 hag 8 eur, 3 mod da zibab :

-DERAOUIDI PENN-KIL-TROAD.
 Ar re n'o deus biskoazh studiet ar brezhoneg, hag a zo gant ar c'hoant da dafañ d'ar brezhoneg, ha n'int ket gouest da gompren an destenn-mañ, forzh penaos. Deskiñ un diazez lavarennoù, anavezout genoù evit ar veilha- deg, seliaou ar re all o komz.
-DERAOUIDI (berbad ar stad-se!), Kanañ, deskiñ brezhoneg ar pemdez, c'hoañ, studial un destenn aes.
-AR RE ALL (Ar re wellañ !) Kanañ, deskiñ en ur ober c'hoariva, studial un destenn lennege.

Ar Veilhaedeg : etre 8 eur ha 10 eur. 2 eurvezh e brezhoneg penn-da-benn, kanañ, kentañ, c'hoañ, ha kouvidi dic'hor- toz ... Beilhadegou prietent en a-raok anez- ho.

Diwallet e vez ar vugale e-pad ar stajou.

Priz pep devezh-staj : 50 lur. Diwall ar vugale : 20 lur. Skolidi : 20 lur.

Evit peseurt tud ?

Ar c'hentelioù : Evit ar re
 -a zo teskiñ ar brezhoneg bremañ,
 ha p'o dije kroget ar bloaz-mañ zoken,
 -a zo gant ar c'hoant da genderc'hel studial.

-a fell dezho adkavout ul live mat a- walc'h e brezhoneg,
 -o deus bet kentelioù pell 'zo.

Ar veilhaedeg :
 -evit ar vrezhonegerien a bep oad,
 -hag evit ar stajidi evel-just !

Deiziadou ar 4 mini-staj :
 2 a viz Kerzu (miz an Azvent)
 28 a viz Genver
 18 a viz Meurzh
 22 a viz Ebrel

Titouroù hag enskrivadur : 40.94.56.57

MIZ KERZU 1989

1	I	G	E	R	I	N	D	L	E
2	G	W	I	A	D	E	R	I	E
3	O	R	E	Z	O	N	O	U	B
4	R	E	N	L	V	N	A	O	
5	E	G	E	T	I	E	T	R	E
6	T	E	K	E	N	N	U	S	
7	L	C	A	P	E	R	T		
8	L	E	C	H	I	D	E	K	A
9	A	Z	E	R	O	S	A	N	
10	Z	H	L	A	E	K	A	N	


GERIOU-KROAZ MIZ DU 89

1									
2									
3									
4									
5									
6									
7									
8									
9									
10									

GERIOU-KROAZ MIZ KERZU

- Hag a oar ur bern traoù.
- War daou du ar penn.
- Gortozet gant mall e dibenn ar miz - Unan e Bro-Velgia, hini ebet e Bro-C'hall.
- Ensavetion Iwerzhonat.
- Eva-preizh - Tigezenn - Din-ne.
- Pesked gour-dour.
- Chom a ra goude bezañ bet gloazet - Melen en e greiz.
- Div zousennad benedeg - Diaes da lonkañ.
- Dreizist-gouvor - En tu arall d'ar Menes Aze.
- Glebiañ.

- A-SERZH**
- Rakger - War du biz Roazonh.
 - Stêr Afrikan - Dor-zivaraez ar solier.
 - Stêr gozh - Etre Pondi ha Korle.
 - Parad a rann enne.
 - Ur vro slavek.
 - Notenn - Penn an nadoz - Pesh a ranker dastorin.
 - Sakramantoù an Iliz - E-barzh.
 - Bleud ha lareh a ya d'eo ober - Banniel.
 - Straed - Raganv-gour - Douez ket.
 - Oberadur a-enep.



Lizhiri.....	2
Emvod Meur DIWAN.....	3
Naoned 18 a viz Du.....	4
Naoned heul.....	5
Gwaskerezh.....	6
Kemennadennoù.....	7
Barzhaz Breizh.....	8
Barzhaz Breizh.....	9
Ar Vretoned ha Doue.....	9
BERR HA BERR.....	10
Demokratelezh.....	11
Aostralia ha sport.....	11
Tabut ?.....	12
Pasionaria.....	12
Capes Korsika/Breizh.....	13
Ekatarenenburg.....	14
Kelenn.....	15
400 Mennad.....	15
Kemennadennoù.....	16
Levriou.....	17
Kentelioù e Naoned.....	18
GERIOU KROAZ.....	19
Keleier.....	19
Hag a nevez ?.....	20

Pennadoù gant Doming Jo - Iivet - Yann Leskildri -MK Stefan Moal - Alan Promene A.P. - Jean-Do Robin - Jean Duchet - Anshel Babel - TL - Robert Baxter - B.Kadoret - Jules Sohier - KRB - H.P. - Alan Raulet - Emgleo Breizh - Alan Penne - Pobl - Paskal ar Marc'heg - K.V.B. - SAE-

Maketenn gant Nolwenn Louarn - Jean Michel Roynard - Lena Louarn -

Skoazell gant Noela Olier - Luc'hskeudennou gant Tangi Louarn - Enbata - OF. - ha Lena Louarn.

RENER BREMAN Mikael Baudu -

KOUMANANT : 150 lur /Bloaz
 Skoazell : adalek 200 lur
 Estren-stad : 200 lur/bl.

Kasit ho chekem da vBREMAN
 8 straed Hoche 35000 RAOZAN

SKRIVIT E-BARZH BREMAN !!!

Evit 100-veit Niverenn ho ke- laouenn kasit pennadoù a-bep seurt, a-raok an 23 a viz...

KERZU ! trugarez vras deoc'h

bremañ 19

KEMENNADENNOU

Goulennit DEIZIATAER

1990

Evit hoc'h emgavioù, emvo-
doù, gouelioù... Titouroù a-bep-seurt
a vo kavet ennañ ...

30 lur an tamm + 6lur frejoù-post.
Adalek 10 skouerenn : 25 lur +15% frejoù-
kas.

SAE, 8 ru Hoche 35000 Roazhon
99.38.75.83

golo voulous glas-du



BEKASIN EN DIROLL!

da c'houlenn gant :

AN DAOL GRENN 8 straed Jean
Hémon 56100r An Oriant


Un dresadenn moulet war :

- tee-shirt, 3 ment 80 lur (70 lur adalek 10)
- badj ront 5 cm, du ha gwenn, 10 lur (7 lur adalek 10)
- dirennoù :
- bras (liv dishefivel) 10 lur
- bihan (du ha gwenn) 10 lur (8 lur adalek 10)

Da werzhañ ivez :

- rochedoù gwenn gant rod an ave-
loù e brezhoneg, 100 lur (80 lur adalek 10)
- tremen-hent divyezhek brezhoneg/
saozneg 30 lur (23 lur adalek 10)

FISKOANIAÑ E BREZHONEG



Deuit da dremen noz-
vezh diwezhañ ar bloaz
1989 en un aergelc'h
plijus ha brezhonek, deuit
da fiskoan KALANNA Kane-
vedenn, Kreizenn Brezho-
negerien Brest, a vo graet
d'ar Sul 31 a viz Kerzu '89
en OALÉD Treglonou. 150 L
gall e kousto deoc'h ar
pred, ha ma fell deoc'h
dont, e c'houlennomp di-
ganeoc'h kas *hoc'h anv a-ge-
vret gant ho chekenn a-raok ar
Merc'her 27 a viz Kerzu da chom*
-lec'h Kanevedenn :

KANEVEDENN

21 straed Inkermann
29200 BREST

*Ma fell deoc'h chom da
gousket war al lec'h e rankot
derc'hel ur gambr en OALÉD en
ur lakaat ur chekenn 30 lur
ouzhpenn en ho lizher (na zisoñ-
jit ket menegiñ hoc'h anv m.p.)*

Pellgomz an Oaled 98.04.07.04.

Pederneg :

Fest-noz «Unvaniezh ar Gelenne-
rien Brezhoneg» d'ar sadorn 31 a viz Meurzh
gant Strobinnell, Lazbleiz, Moal ha Peron, an
Intañv ha Robin.

Plijadur ha brezhoneg a vo.

Gwened :

Betek ar 15 a viz Kerzu diskouez-
deg diwar-benn Barzhaz-Breizh e Le-
vraoueg-kêr, straed Nevenoe, da geñver
150vet bloavezh embannadur kentañ obe-
renn Kervarker.

NEVEZ !

30 vloaz "zo eo bet degemeret gant
an ONU ur mennad a-zivout diskleriadur
gwirioù ar vugale. Hiziv an deiz, netra ken e
Bro C'hall e vefe 50.000 bugel o c'houzañv
gwall daolioù, ha bazhadoù (hervez ar
gevredigezh «Enfance et Partage»). Ha pet
ha pet a vez c'hoazh, dre ar bed a-bezh,
gwallgaset ha dilezet gant o zud. E Manille,
e Bangladesh, e Bro-Salvador, pe e Bro-
Irak pe c'hoazh e Bro Afrika ar Su ?

D'an 20 a viz Du, e New York, en
ONU, eo bet sinet «Konvention» Gwirioù ar
yaouankiz. Poezus eo evit Keit Vimp Bev
diskouez d'ar vrezhonegerien, ha d'ar re
vihan dreist-holl, e peseurt stad e vev ur
bern bugale deus o oad, en tu all d'ar bed.

Poezus eo ivez diskouez d'an
nann-vrezhonegerien e vez liammet ar
brezhoneg gant kudennoù etrevroadel a
seurt-se. Embannet eo bet al levr en italia-
neg, saozneg, galleg... ha brezhoneg! Savet
eo bet an istorioù ha treset eo bet al levr gant
arzurien eus ar broioù paour, Indonezia,
India, Filipinez.

Kaset eo bet al labour a-benn gant
kevredigezhioù evel Terre des Hommes pe
Peuples Solidaires.

Ul lodenn deus an arc'hant goune-
zet gant an embann e yezhoù Europa a
servijo evit sikour embann ar memes levr e
yezhoù ar broioù paour, evit ma c'hellfe ar
brasañ niver a dud prenañ al levr-se du-
hont. Servij a raio evelse al levr da gelaouiñ
amañ ha da stourm du-hont ouzh korvoe-
rezh ar vugale.

Priz gwerz al levr : 55 lur, 60 lur war-
eeñ gant KVB 29160 LAZ.

